

Pronost Per (Trelez 1861 - Brest 1909)

Lili ha Roz-Gouez, bet embannet e 1902.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Goulenn a ra Pronost ma vefe skrivet brezoneg reiz. Daoust da ze e ra gand "pehini", "pere" e-leh "an hini", " ar re", ha gwechou 'zo e vez akordet gantañ ar verb gand e rener.

Faziou kemmaduriou a ra aliez. Reizet int bet.

Galleg eo e ereadurez meur a wech.

Pennadou politikel zo :

E-barz **Lili ha roz-gouez** e tiskouez e zantimantou a-eneb ar Republik. A-du e oa gand ar Roue, ar Chouanted, a-eneb ar Juzevien, hag a-eneb lezennou an Trede Republik : ar skoliou, al lezenn a dlee dond da wir e 1905.

Marteze e soñjoh : "Perag embann seurt traou ? » Respont : Evid rei da houzoud ar pezh a zoñje tud 'zo e fin an naontegved kantved hag e penn an ugentved ».

Pegen pell e oent euz al "laikelez" !

**TAOLENN
LILI HA ROZ-GOUEZ**

Ar Gonideg	D'ar gwennili
Kinnig	D'ar pardaez-noz
Kenvroiz ker euz Leon	O palarad
	Pichon
<i>Pennadou politikel</i>	Ar pesketaer
D'ar gannaded republikan	Paotred ar bezin-tonn
Laeron ar Frañs	Arabad en em fazia
Al leon	Va gwezenn-dero
Re hlaz Breiz-Izel	Ar horriganed
Istor ar bloaz 1899	An neiz
D'am mibien	Ar viltañsou
Petra eo ar vro ?	Maro ar hi
D'ar barz	An diwaller loened
An tad kristen d'e vab	Eun tech hudur
Marianna, lip da bao !	Maro Fañch
Abostoled an droug	Min-Du
D'ar ministr André	D'ar vugale
Breiz-Izel hag ar spered republikan	Paolig
Kannaded ar henaouerien	Klemmou ar hlañvour yaouank
Diwall, Frañs	Jezuz hag ar vugale
Oberou spered an dispah	Jezuz hag ar pinvidig
Eun nebeud fiziañs	An den
Botrel	Ar holonel euz Villebois-Mareuil
Adarre Hoche	Bazad d'ar Zaozon
En a-raog, Katoliked	Ar Zaozon digalon
Gwechall ha bremañ	En eur vond d'an Tonkin
A-raog	Goude an emgann
Kan a vrezel Paotred Vreiz-Izel	Marvet war dachenn an emgann
Maro ar Juzeo	En distro euz an Tonkin
	En eur vond d'ar pardon
<i>Pennadou n'int ket politikel</i>	Ar gozni
<i>(nemed eur re bennag)</i>	Credo al labourer-douar
Ar beorien er hêriou	Kolach Lezneven
E skol va farrez	Va gourhemennou diweza
An teod flour	
Jañned	
Patatezenn Viel	
Ar barz hag e viniou	
Amzer gollet	
Ar groaz, treh atao	
Treflez ha ster ar Zeaz	
Va Mamm	
Al labourer o vond d'e dachenn	
Ar honikl	

Ar goukoug Karantez ar vro Tehit diouz ar hêriou Ar vrae hag ar baluhenn Ar rozell	
--	--

*Bevet AR GONIDEG !
 Reizer ar Brezoneg ;
 Dalhom, a wir galon,
 Euz TROUDE ar soñjezon.*

KINNIG

Al levr-mañ a ginnigan d'am zad, d'am breudeur ha d'am c'hoarezed ; re ziwevad on, siwaz ! d'her hinnig d'am mamm ger an hini¹ or gortoz oll er Baradoz.

Her hinnig a ran, ohpenn, d'an Aotrou A. LE STUM en-deus bet ar vadelez da rei din an dorn evid skriva an toniou a zo ennañ, ha d'an Aotrounez F. VALLEE (ar barz Abherve), F. JAFFRENNOU (ar barz Taldir), ar re² a zivenn ken nerzuz or yez, en eur mare ma klasker, dre beb ardou, he disgwrizienna euz Breiz-Izel.

Per PRONOST.

KENVROIZ KER EUZ LEON

Poent braz eo d'ar Vretoned a fell dezo e chomfe o yez beo, enebi ouz ar geriou divrezoneg a deu, nebeud-ha-nebeud, d'en em ruza en or yez, en eur vouga ar gwir vrezoneg.

Daoust ha ne glevit ket bemdez, en-dro deoh, geriou evel ar re-mañ : parlant - kaozeal - jamez - pousier - kontantamant - vizach - sertenamant - koler - joa - uzach - posubl - komprenn ?...

Nag a bed kant ger evel-se a hallfem da lakaad dirag ho taoulagad !

Geriou brezoneg gwirion on-eus, heb kaoud ezomm euz ar geriou nevez-se, ha labour fall a ra³ ar skrivagnerien o laka en o skridou, war digarez eo deuet ar hiz da gomz evel-se.

Dre ar hazetennou, al levriou, ar gwerziou, ar zoniou, eo e teuim a-benn da zegas a-nevez ar hiz euz ar gwir vrezoneg.

Skrivagnerien, room eta an dorn an eil d'egile evid enebi ouz an enebour.

D'ar barz eo da zigeri an hent.

Med n'eo ket a-walh lezel a-ziaskren ar geriou divroad gwisket e brezoneg, oh eun enebour all ar barz a dle c'hoaz herzel.

¹ an hini : "pehini" er skrid orin.

² ar re : "pere" er skrid orin.

³ a ra "a reont" er skrid orin. Akordi a ra ar verb gand e rener.

Ral e kaver eur barzoneg êz a-walh da lenn ha da gleved, rag kazi e peb leh e weler vogadell oh vogadell (hiatus) pe eun hanter re a heriou mahagnet dre ar virgulenn uhel (apostrophe).

Klasket em-eus el levrig-mañ enebi gwella ma hallen ouz an daou enebour braz-se d'or yez ; plijet gand Doue e teuy kement barz yaouank da ober atao gwelloh-gwella, evid brasa mad an teod hag ar skouarn ha, dreist-oll, evid diskouez n'eo ket ar brezoneg ken rust ha ma hen lavar kalz a dud, dre warizi avad, peurliesad.

Per Pronost.

LILI HA ROZ-GOUEZ

D'AR GANNADED REPUBLIKAN

Evel ar Juzevien, nahet hoh-eus ho Toue,
Gand aour hoh-eus ivez savet skeudenn eul leue,
Hag ar bobl, evelдох, pe douellet, pe deuet dall,
Ne zelaou mui bremañ nemed he zechou fall.

Kriet hoh-eus kement, war bep ton, e peb leh,
N'eo nemed gevier-oll ar pezh a grede deh,
Ma'z eo deuet, en eun taol, eur bleiz e-leh eun oan,
Ha goulenn 'ra, d'he zro, kement aour, eviti⁴.

Ne fell ket dezi mui kleved ho prezegenn,
Spouronet e chomit pa laosk he youhadenn,
Hag e welit hirio, pa'z eo re ziwezad,
Oh deuet da gemered ar bleiz evid eur had.

Eul labour vad, emichañs, he-deus greet ho skwer fall !
Rag warhoaz marteze : dispah, gwad ha tangwall,
Ar Frañs en eun ivern, noz-deiz ar hillotin
Hag on enebourien, a bep tu, war on hein.

C'hwi 'garfe marteze dond bremañ war ho kiz ?
Marianna n'he-deus mui nemed eur goz hiviz,
Kazi roufennet eo, kement he-deus lammet,
Ruillet ha korvatet, gand al lakepoted.

Siwaz ! kaer ho-pezo rei dezi dillad gwenn
Hag eun hiviz nevez, n'eo nemed eul lovr-genn,
Ken flêriuz, ha ken louz ! ma ve gwelloh dezi
Mervel gand he hovad, er houer, e-kreiz ar pri.

Gwelloh 've 'vid or bro, rag eur vez eo gweled
Frañs Sant Loeiz, Gwesklin⁵, hirio ken stlabezet,
Hanter-vouget ohpenn gand krabanou Judaz,
An trubard en-deus greet tacha Doue war ar groaz !

⁴ eviti : "evitañ" er skrid orin. Gourel eo "pobl" evid Pronost, evel "peuple" e galleg.

⁵ Gwesklin : Duguesclin er skrid orin.

LAERON AR FRAÑS

N'hoh-eus en ho kenou, bandenn Frañmasoned,
Nemed komzou flemmuz 'eneb ar Vretoned ;
Ma karfed ho kredi, Bro-Hall a ve, pell 'zo
Dismantret ganeom ha demdost he maro.

M'o-deus ar Vretoned, gand paotred ar Vendée,
Enebet keid amzer, gand nerz, ouz hoh arme,
Eo 'vid dalher o gwir : rag, o tivenn o Roue,
E tivennent Bro-Hall, Breiz-Izel hag o Doue.

C'hwi n'hoh-eus gwir ebed evid ren ar vro-ma' ;
Ar Frañs 'zo d'on Rouaned ha d'on dugez Anna ;
Rag pa roas Breiz-Izel he dorn leal da Vro-Hall,
N'oa ket c'hoaz en or bro ganet ho kouenn, tud fall.

Ho Republik n'ez eo nemed eul laeroñsi ;
Rag ho tispah, c'hwezet hepken dre gasoni,
A zo deuet euz Berlin, euz Francfort, euz Londrez,
Kement 'eneb d'or Feiz evel d'on Rouanetlez.

Treh oh bet, gwaz a ze ! gwaz a ze 'vid ar Frañs !
Abaoe : fallagriez, dispah ha dismegañs,
Frouez brein ar Juzevien hag ar Frañmasoned,
A glask ampoezoni bro yahuz on Rouaned.

Med ho lorgnez ne hall dond en on izili,
En or gwazied, biken, ho pinim da vervi,
Nann, biskoaz gwad Juzeo, biskoaz gwad Frañmason,
Ne day beteg kalon ar Gall hag ar Breton.

AL LEON

Al leon a zo kousket, e skilfou prennet-oll ;
An anevaled louz a hall, en o diroll,
Stlabeza kement tra, lakaad ar freuz er vro,
Rag ar bouhed a gred, da vad, al leon maro.

Bez' e oa c'hoaz tud vad e-keñver ar re baour ;
Ne zellent ket diou wech ouz ar boan, ouz an aour,
Kement-se 'oa re gaer ; kerkent, a-grabanad,
Al laeron da zachell⁶ mouneiz an emzivad.

Bez' ez oa soudarded a nerz hag a galon ;
Saozon ha Prusianed a grene, gand an aon,
Re galoneg ez oant ; buan ar Frañmasoned
Da lakaad o hraban war or jeneraled.

Bez' ez oa barnerien troet-oll gand al lealded ;
Biskoaz war hent an droug n'o-doa greet eur gammed,
Kement-se 'oa re vad ; ar forbaned dioustu
Da lakaad, en o leh, lamponed diouz o zu.

O weled kement-se, tud hag a gar o bro,
'Zo bet eet, mad a reent, eun tamm kounnar enno ;
Evid ober dezo tevel ar wirionez,
Buan ez int prizoniet, 'vid moug a prim o mouez.

Med amzer an dud fall, ma'z eo kriz, a zo berr ;
Ar Frañs oll a zo skuiz, koust a raio d'o ler !
Rag al leon dihunet - Frañs nerzuz on Rouaned -
A ray distrei d'o zoull an oll haillevodod.

⁶ da zachell : ? (da zach).

RE HLAZ BREIZ-IZEL

War don : *Cadet Roussel*.

Soñj on-eus c'hoaz euz ar re hlaz
A oa gand *Hoche*, d'an dispah braz ;
Diwallom, ar ouenn anezo,
Evel yeot fall, 'zo chomet beo.
Dalhom d'or yez 'vel d'or pennbaz,
Ha kriom oll : harz ar re hlaz !

Ma n'eo ket evid skuill ar gwad
En Arvor e taolont o zroad,
Emaint o klask, dre beb ardou,
Lakaad ar freuz en or mêziou.
Dalhom d'or yez 'vel d'or pennbaz,
Ha kriom oll : harz ar re hlaz !

Ar pez a halvont ⁷gouiziegez
Evidom 'zo trubarderez,
Ma karont kement o gwezenn⁸,
Ni 'gar gwelloc'h an overenn.
Dalhom d'or yez 'vel d'or pennbaz,
Ha kriom oll : harz ar re hlaz !

Hag, evito, ma n'ez eus ket
Baradoz nag ivern ebed,
Ar Vretoned a gred e Doue
Ha ne nahont ket an Ene.
Dalhom d'or yez 'vel d'or pennbaz,
Ha kriom oll : harz ar re hlaz !

Ar geriou *natur* ha *skiantchou*,
O-deus atao leun o genou ;
Ma' z eo mad gouzoud skriva, lenn,
Da genta ni 'gar ar bedenn.
Dalhom d'or yez 'vel d'or pennbaz,
Ha kriom oll : harz ar re hlaz !

Euz ar stered klask an niver
Ne dalv ket eur pennad *pater* ;
Perag kemered lunedou
Evid selled ouz an Neñvou ?

⁷ a halvont : a anvont.

⁸ o gwezenn : ?

Dalhom d'or yez 'vel d'or pennbaz,
Ha kriom oll : harz ar re hlaz !

Eur ar re hlaz kement mastin
A ra d'an oll Vreiziz c'hoarzin ;
Bretoned int, war o meno,
Heb gouzoud ar yez euz or bro !
Dalhom d'or yez 'vel d'or pennbaz,
Ha kriom oll : harz ar re hlaz !

Setu perag en or mêziou,
Kanom dezo, leun ar genou :
Kee da zutal, tamm haillevod,
Pe diwall ouz troad al loa yod.
Dalhom d'or yez 'vel d'or pennbaz,
Ha kriom oll : harz ar re hlaz !

ISTOR AR BLOAZ 1899

Setu, gand ar bloaz-mañ, kant vloaz all tremenet,
D'hen gweled o vervel, avad, ne leñvim ket,
Rag kement en-deus greet a droiou divalo,
M'em-befe c'hoant, kentoh, dañsal pa vo maro.

Rag bloaz ebed n'en-deus, war or bro gaer a Frañs,
C'hwezet muioh a zraill, a vez, a zismegañs ;
Or bugale-vihan a vo sebezet-braz
Pa lennint an istor euz eun heveleb bloaz.

Lenn a raint en istor : eur ministr kornandon,
Ministr republikan, gand aon ouz ar Zaozon,
En-deus, evel eur had, kemeret buan an teh⁹,
En despet d'eur zoudard kaloneg dezo treh.

Eun ofiser judeo¹⁰, gwerzet or bro gantañ,
A zo bet barnet mad, diou wech e-leh unan,
Med Panama¹¹ kenta, mignon al lamponed,
Buan hen lez da redeg, evel e genseurteg.

E-pad an azmer-ze, Frañsizien a galon,
Evid eun torfed faoz, 'zo stlapet er prizon¹² ;
E-leh tud leal, ez eus roet dezo barnerien
Ar re¹³ da Varianna n'int nemed mevelien.

E-pad ma vez miret ouz Doue da vond er-mêz
Hag ouz ar vugale, kuzet, er skol, ar groaz,
An dispharien ruz a freuz an ilizou¹⁴
Hag a hall, e peb leh, ober prezegennou.

Ar Frañs oll, greet nerzuz gand gouenn yah on Rouaned,
A zo sturiet, o mez ! gand pep seurt forbaned ;
Pevarzeg-kant vloaz gloar 'zo mouchet brema'
Ha tron Frañs stalbezet gand pri louz Panama.

⁹ kemeret buan an teh : afer Fachoda (1898)

¹⁰ Eun ofiser judeo : Dreyfus.

¹¹ Panama : afer Panama. (1892).

¹² Frañsizien a galon,

Evid eun torfed faoz, 'zo stlapet er prizon : ?

¹³ Ar re : "Pere" er skrid orin.

¹⁴ E-pad ma vez miret ouz Doue da vond er-mêz

Hag ouz ar vugale, kuzet, er skol, ar groaz,

An dispharien ruz a freuz an ilizou : divennet e oa bet ober prosesionou. Krouidigez ar skoliou laik (lezennou Jules Ferry) ; lezenn 1905.

Setu petra lenno or bugaligou keiz :
Istor ar bloaz euzuz, istor an dud direiz.
Ra deuint, pa vint gwazed, da zevel drant o fenn,
Ha ra harzint ar Frañs euz kemend a vouillenn.

D'AM MIBIEN

Skreiz gand eul labour denn, evid chom atao paour,
Pa bourmen al laeron, ken lorheg gand an aour,
Glaharet o soñjal e teu da veza treh
Ar re fall d'ar re vad, e pep stad, e peb leh,
Ha kounnaret, dreist-oll, o weled Frañsizien
O tond d'en em stleja dirag ar Juzevien,
Va dorn, en eun taol-kont, a gren gand ar gounnar,
Ha va fluenn kerkent 'zo diskaret d'an douar.
Koll a ran , eur mare, nerz-kalon, spered lemm,
Evel eur bugelig e venn kleved o klemm :
« Perag taoler pelloh a bep seurt malloziou
War gement a vouillenn, war gement falloniou ?
A-walh a labour, hag a-walh a boan !
Me 'fell din a-vremañ tehed diouz an emgann. »
Er gambr tosta kerkent e klevan eur vouez gae,
Ken dudiuz ha mouez al labousig er hae ;
Va bugel yaouanka, ken koantig hag eun Êl,
A oa, seder ha sioul, kousket en e gavell ;
Hogen, a-boan m'en-deus klevet ar breur henna
Mouez ar hrouadurig, dihunet mad brema',
Heb chom da varhata, da gaoud e vreur bihan
E lamm, en eur gammed, evid pokad dezañ.
Bugaligou dinamm, c'hwi ne ouzoh ket c'hoaz
Perag ez eo rannet kement kalon eur gwaz,
Dond a reoh da greski, c'hwi 'houzañvo, d'ho tro,
Evel don marteze, meur a boan haro.
Hag e venn digalon da derri va fluenn
Heb ho lakaad da gaoud kas ouz ar Juzevien ?
Evel kemend a dud e yafen da guzed,
Heb herzel, ha gand aon da veza chadennet ?
O ! nann, nann, evidoh ez eus meur a varzaz
Gwriziennet em empenn, hag em dorn eur pennbaz ;
Ha ma teuan da vervel, mahagnet en argad,
Lennit kement barzaz en-deus skrivet ho tad,
Ho spered 'vo lemmoh, nerzusoh ho kalon,
Hag ez eoh, evel don, en a-raog, hag heb aon.

PETRA EO AR VRO ?

Al leh m'om deuet er bed, an ti-soul, ar hastell,
An hent el leh m'on-eus c'haoriet p'edom bugel
Ar hoad hag ar foenneg, ar menez, an draonienn,
An tour a zao ken uhel a-zindan ar goabrenn,
An daol euz an ti-skol ha kador an iliz,
Or yez, or gizioù, kement re 'zo kenvroiz,
Ar gwad c'hweg a ro buhez ha nerz d'or halonou,
Gwad an heveleb tud, ha feiz koz on tadou.
Abalamour da ze ni 'gar kement or bro !
Kement ! Ma yafem oll eviti d'ar maro.
Abalamour da ze ni 'fell or-be kalon
Da vale d'an emgann, pa vo red, hag heb aon.
Dalher penn d'ar Zaozon evel d'ar Brusianed¹⁵,
N'eo nemed eur hoariell, evidom, tud kaled ;
Med ar re-mañ n'int ket an enebour brasa ;
Eun enebour gwasoh a dleom da ganna,
Eun enebour fallagr, krisoh eged eur bleiz,
En or bro diskennet, hag a vev en or hreiz,
Eun trubard hag a sko dre guz hag a-dreñv-kein :
Ar Frañsamon-Judeo, an den a galon vrein !
Dalhom hiviziken digor on daoulagad,
Savom an dorn d'on tro : bazad evid bazad !
Na lezom ket da skuill e-touez or bugale
Ar skridou milliget, ken louz ha m'int dizoue ;
Skridou Satan a dle beza taolet en tan,
Rag ar fall er galon a hall gwrizienna buan.
Hogen ezomm on-eus, muioh eged biskoaz,
Da zalher stard d'or feiz, rag heb ar feiz, siwaz !
N'ez eus ket a lealded, na karantez ar vro,
Rag eur bobl hep kredenn a zo tost d'he maro.
On enebour her goar ; setu perag e klask
Mouga feiz on tud-koz, 'vid berraad on nask.
N'en em lezom pelloh da veza ken touellet
Gand o frezegennou trubard ha milliget ;
Gand an tad a red c'hoaz e gwazied ar bugel,
Gand ma chomo yahuz, n'eo ket tost da vervel ;
E feiz ivez 'zo kreñv, ha gouzoud 'ray, d'e dro,
Evel gwechall e dad, divenn nerzuz e vro.

¹⁵ d'ar Brusianed : brezel 1870.

D'AR BARZ

E-pad ma'z out yaouank, o barz ! lez da spered
Atao lemm, atao leal, e peb leh da reded ;
Sko war an dud e karg, pa skrivont lezennou
Da zachell war da vro kement seurt gwallreuziou ;
Med ma teuez en eun taol, troidellet gand an aour,
Da werza da goustiañs, kentoh eged chom paour,
Ma teuez ivez trubard, kentoh eged herzel,
A-dreñv eur seurt torfed ! gwelloh 've dit mervel.

Sko war an teodou louz, war an dud a skwer fall
A glask ampoezoni kalonou didamall,
N'o lez ket da brezeg, na da ziskouez o flemm
Hep taoler, ma ve red, kreñv da zorn war o dremm.
Med ma teuez da lakaad eun deiz da ouiziegez
E skridou divergont hag e levriou divez,
En da galon ma teu techou fall da henel,
A-dreñv eur seurt torfed ! gwelloh 've dit mervel.

Divenn feiz da dud-koz oh ar Frañmasoned ;
'Vid Jezuz hag e groaz, kee d'an emgann bepred,
Hag evid dond a-benn euz ar skridou difeiz,
Kan nerzusoh da Zoue, skriv heb ehan, noz-deiz ;
Med euz da feiz ma teuez eun devez da ruzia,
Hep kaoud aon da lakaad da vamm baour da leñva,
Ma nahez ar bedenn desket en da gavell,
A-dreñv eur seurt torfed ! gwelloh 've dit mervel.

AN TAD KRISTEN D'E VAB

Pa'z ez d'ar skol, va bugel ker,
N'eo ket a-walh deski da gentel,
Goulenn ivez, en da bater,
Beza dinamm atao 'vel eun Êl ;
Hag evid beza den eun deiz,
Ha chom dispont dirag ar maro,
Da genta dalh mad d'az feiz,
Muioh a ze te garo da vro.

Diouz ar re baour ha mahagnet
Na zistro biken da zaoulagad,
Divenn kentoh, m'eo disprizet,
Gand kalon, ar paour-kêz emzivad ;
Ar bugel ha n'en-deus ket truez
Ouz an neb a skuill daelou c'hwero,
Abred pe ziwevad e vez
Disprizet ha kastizet d'e dro.

Arabad dit ruzia biken
Euz ar pezh a lavar da goustiañs,
Gra fae war goaperez an den,
En da gredenn hepken bez fiziañs ;
Bez' ez eus mignoned hirio
Hga a hallfe beza treiz warhoaz,
Pa vezi dilezet ganto,
Da goustiañs a vo da vignon c'hoaz.

Na zelaou ket prezegennou
Al lakepoded fall a-vrema',
Krial a reont, 'leiz o genou,
N'ez eo karantez ar vro netra !
Gra skouarn vouzar ha lenn istor
Duguesclin, Janned d'Arc ha Sant Loiz
Da galon a jomo digor
D'ar garantez evid da genvroiz.

MARIANNA, LIP DA BAO !

Ar gwiniz a zo druz hag uhel en tachennou,
Gouel ar Zakramant¹⁶ 'zo, med ar vugaligou
Ne hallint ket, er-mêz, meuli Krouer ar bed,
Prizoniet int bremañ dre youl or hannaded ;
Ar banniel ruz avad en êr 'zo displeget,
War e lerh e weler, o youhal soniou louz,
Lamponed an dispah a lezer da reded
Ha da lakaad ar freuz er vro, gwechall didrouz.

Na kement-se 'zo brao !

Marianna, lip da bao !

Evel an Ebestel, ar Relijiuzed
War ar Relijion a brezege bepred,
En on iliz-parrez, pa veze Jubile,
Miret ez eus outo bremañ prezeg morse¹⁷ ;
Med an dispaherien, e peb leh, a hallo,
Skoazellet ha paeet gand ar Frañmasoned
Krial 'eneb ar Feiz ha karantez ar Vro,
Eneb an dud didrouz hag ar Gatoliked,

Na kement-se 'zo brao !

Marianna, lip da bao !

Nag a blahed yaouank, en despet d'o hened,
O-deus, a galon vad, kimiaded diouz ar bed !
Ya, troet o-deus o hein d'ar blijadur, d'an aour,
Evid beza mammou d'an emzivad, d'ar paour ;
Ar re goz, ar re glañv, ar vugaligou geiz,
Euz o divreh, moarvad, a vezo diframmet,
Rag honnez eo lezenn al laer hag an difeiz,
Taolet 'vezint er-mêz hag o houentchou prenet.

Na kement-se 'zo brao !

Marianna, lip da bao !

¹⁶ Gouel ar Zakramant : anvet "Gouel Doeu" ivez, d'ar yaou a zo da heul an Dreinded.

¹⁷ Miret ez eus outo bremañ prezeg morse : ?

ABOSTOLED AN DROUG

Tud lorheg ha tud heb kredenn
A lavar n'ez eus ket a Zoue,
E peb leh an *Natur*, hepken,
Emezoh¹⁸, war bep tra 'zo *Roue* ;
Med kaer ho-pezo, c'hwi 'vezo,
Evel ar re ziod ho kreda,
Asinus asinum fricat¹⁹,
Azened oh en em lipad.

Ar *Relijion* 'zo krouet,
Emezoh, gand ar *Veleien*
Ar re²⁰ a gar dalher kabestret,
'Vel loened, ar henaoueien ;
Med kaer ho-pezo, c'hwi 'vezo,
Evel ar re ziod ho kreda.
Asinus asinum fricat,
Azened oh en em lipad.

Ar *Baradoz* ivez a zo
Eur zorhenn greet evid ar paour,
Evid war an douar ma poanio,
Heb biskoaz kaoud e lodenn aour ;
Med kaer ho-pezo, c'hwi 'vezo,
Evel ar re ziod ho kreda.
Asinus asinum fricat,
Azened oh en em lipad.

An *Ivern* a zo c'hoaz ivez
Eur spontaill, mad d'ar vugale,
Med an den n'en-deus ket evez
Da daoler oh ar spontaill-ze ;
Med kaer ho-pezo, c'hwi 'vezo,
Evel ar re ziod ho kreda.
Asinus asinum fricat,
Azened oh en em lipad.

Rag beb *Aviel* or *Zalver*
Ne vo nemed freuz e peb leh,
En ho lavariou ma kreder,
An droug d'ar mad a vezo treh.

¹⁸ Emezoh : "Eme c'hwi", er skrid orin.

¹⁹ Asinus asinum fricat : (latin) : eun azen a lip eun azen.

²⁰ Ar re : "Pere" er skrid orin.

Ya, kaer ho-pezo, c'hwi 'vezo,
Evel ar re ziod ho kredo.
Asinus asinum fricat,
Azened oh en em lipad.

D'AR MINISTR ANDRE²¹

Kêr Vrest he-deus savet, en deiz all, eur skeudenn
Evid or zoudarded maro²² war an dachenn
Hag or martoloded beziet e-barz ar mor,
D'ar re 'zo bet er boan eo dleet an enor.
Med daoust hag eur skeudenn da viken a bado
Evid degas da zoñj perag ez int maro ?
Nann, Bretoned nerzuz, netra 'barz er bed-ma'
Ne bad oh an amzer, rag pep tra 'dle uza.
Marvet int 'vid or bro, med gwir vugale Vreiz,
Ohpenn an nerz-kalon o-deus o-deus ivez ar feiz.
Perag int ken dispont war dachenn an emgann ?
Perag, evel leoned, ez eont e-kreiz an tan ?
Perag ? Abalamour ma kredont en eun Doue,
Hag e ouzont o-deus 'vid an Neñv eun ene.
Ha perag en deiz all, e-hazr troad ar skeudenn,
Ar ministr n'en-deus ket komzet euz or hredenn ?
Daoust hag e kav dezañ e ve bugale Vreiz
Nerzuz, ma ve lammet euz o halon ar Feiz ?
O ! nann, aotrou ministr ; ar Vretoned a dle,
Evid kared o bro, da genta kared Doue.
Ho prezegenn dizoue, dirag on re varo
O-deus skuillet o gwad evid divenn o Bro,
A zo bet evidom, Bretoned a feiz kreñv,
Evel eun taol kontell roet gand eur yud, a-dreñv.
André, dalh evidout, en distro da Bariz,
Da spered frañmason, ni 'zlaho stard d'or Feiz !

²¹ ANDRE : ministr ar brezel e 1900.

²² maro : "marvet" a vefe bet gwelloc'h.

BREIZ-IZEL

HAG AR SPERED REPUBLIKAN

Ober vad d'an nesa, n'eus forz euz pe leh eo,
Euz a-berz eur hristen n'ez eus netra ken brao,
Pe ve gwenn pe zu-pod, pe ve ruz pe velen :
Eur gwir gristen a wel ar garantez hepken.

Med da genta, 'michañs, a-raog kemered truez,
E tleer selled mad ha beza war evez ;
Rei, war ar poull-kalon, tommder d'eun naer-wiber
O flemmo da houde, 'zo beza re dener.

Ni, Bretoned, a zo re vad 'vid meur a hini²³
Ar re ²⁴hoarz dirazom hag a-dreñv-kein zo yud ;
Ma teuont re hallouduz, re lorhed, en or bro,
On drantell hebdale 'vezo lipet ganto.

Ni 'oa ken eüruz gwechall gand or giziou,
Gand or feiz katolik ha gand yez on tadou,
Ma chomom sebezet o weled divroidi
O komz bremañ groñsoh egedom en on ti.

Ya, bremañ pa ouzont o-deus en on tachenn
Kemeret, stard da vad ha don braz, o gwrizienn,
E fell dezo beza kalz muioh c'hoaz en êz,
Ha ganto, marteze, ni 'vo taolet er-mêz.

N'on-defe nemed lenn eun nebeud an istor
'Vid gweled peur d'an droug on-eus bet roet digor :
Adaleg ar mare m'om bet diod a-walh
Da jom sioul, heb herzel oh spered an dispah.

Hag oh ar spered-se, spered republikan,
Ma n'on-eus ket kalon da vale d'an emgann,
Hebdale ni vezo sklaved oll, Bretoned,
Dindan an dud difeiz hag an haillevodet.

Bretoned, diskouezom on-eus c'hoaz nerz kalon,
Dalhom d'or spered koz, ha bazad d'al laeron ;
Breiz-Izel 'zo deom, or yez hag or hredenn ;
Evel Jezuz, en Templ, kemerom ar gordenn.

²³ meur a hini : "meur a dud" er skrid-orin.

²⁴ Ar re : "Pere" er skrid orin.

KANNADED AR HENAOUEIEN

Anavezoud a ran e-touez ar Gannaded
Kalz tud a vuhez direiz, eur rumm haillevodod,
Ar re²⁵ gwechal a oa, 'vel eur wrizienn heb dour,
Dizehet gand an naon, truilleg, laoueg ha paour ;
Med ma ne garent ket labourad 'vid beva,
O-deus kavet an tu da festa mad brema',
Ha n'eo ket sebezuz, toed ar hlabouserien
A deu ken êz euz ar henaoueien.

Elektourien, mar plij ! digorit ho kenou
Ha gwelit pegen braz e teu kov hoh Aotrou.

Anavezoud a ran e-touez ar Gannaded
Kalz a bennou goullo, ken diod hag azened,
Ne ouient ped favenn a ya 'vid ober nao,
O baz a gemerent atao pa veze glao ;
Ha koulskoude, gwelit, kavet o-deus, d'o zro,
An tu da vond e-touez pennou brudet ar vro ;
Ma n'o-doa ket spered eun nebeud en o fenn,
A-leiz o hov o-doa kas oh ar feiz kristen.

Elektourien, mar plij ! digorit ho kenou
Ha gwelit o tremen, goapauz, hoh Aotrou.

Anavezoud a ran e-touez ar Gannaded
Tud hag a lavarfed dinamm evel êled,
Roet e vije, moarvad, heb koves, absolvenn
D'an dud-se derad oll gand al labourerien ;
Hogen, tra sebezuz ! n'oant nemed yudazed
Gwerzet d'ar Juzevien ha d'ar Frañmasoned ;
Bremañ, pa m'int e karg, ganeoh savet uhel,
E lonkint kement tamm 'zo c'hoaz war ho trantell.

Elektourien, mar plij ! digorit ho kenou
Ha gwelit, digor-braz, kraban laer hoh Aotrou.

²⁵ Ar re : "Pere" er skrid orin.

DIWALL, FRAÑS

E-keñver da wir vugale,
Frañs, te 'vez aliez didalvez,
Diwall da gaoud keuz, hebdale,
Ha da veza goloet a vez ;
Lezet eh-eus ar Juzevien,
O henseurted Frañmasoned,
`War o lerh an dud heb kredenn
Hag a beb seurt haillevoded,
Da flastra dindan o zeuliou,`
E Bro-Hall kerkloulz hag e Breiz,
Kement frankiz, kement gwir²⁶,
Da lezennou koz ha da feiz.
Dall a-walh out bet d'o lezel
Da daoler er-mêz euz o bro
Tud leal, ar re²⁷, beteg mervel,
En despet da ze, az karo,
Rag on Roue, LUR-SALUS²⁸ ha BUFFET²⁹
Ne zoñjent nemed en eun dra :
Klask, a-raog ma vijes kouezet,
D'az talher c'hoaz drant en da za ;
O halon a rann gand glahar
En eur weled o mamm ken ker,
Brudet e pep korn euz an Douar,
O tond da veza ken dister.
Siwaz ! chomet out pounner-gleo,
D'o zelaou p'oa koulskoude red,
Hag ar pezh a zelaouez, eo
Prezegenn yud ar forbaned
Ar re da zuno, da zraillo,
Hag evel ar POLOGN gwechall,
Gwasket a bep tu, te 'ranko
Mervel, kaer e-pezo yudal.

²⁶ kement gwir : "kement gwiriou" er skrid orin.

²⁷ ar re : "pere" er skrid orin.

²⁸ LUR-SALUS : den a-du gand ar roue.

²⁹ BUFFET : (sur a-walh eun den a-du gand ar roue).

OBEROU SPERED AN DISPAH

A-raog am teuas war or mêziou
Spered an dispah da dremen,
Ni 'oa lorheg euz or giziou
Euz or yez hag euz or hredenn ;
Ar bragou braz, an tok ledan,
A oa gwiskamant ar gwazed,
Ar hoof gwenn hag al lostenn hloan,
Hepken, a blije d'ar merhed.

Bremañ ne hallfet ken anaoud ar Vretoned,
Evel ar vourhizien, ar gwasked 'zo gwisket,
War gern ar penn, mar plij ! e weler ar merhed
O spillenna tokou gand roz faoz kurunet.

Or yez koz ha kaer n'oa ket c'hoaz
Gand yez all ebed stlabezet,
Gwenn a oa gwenn, glaz a oa glaz,
Brezoneg mad 'veze komzet,
Da beb eured, d'ar pardonieu,
En o zav war eur varrikenn,
Ar varzed a gane soniou
Ha gwerziou Breiz-Izel hepken.

Bremañ Per ne gredfe mui prezeg evel Yann,
Abalamour ma oar, eun nebeud, yez Vro-Hall,
Lavared a ray 'ta *non*, kentoh eged *nann*,
Ha lorheg-braz ohpenn eo gand e halleg fall.

Ne veze ket ruziet neuze
Euz feiz kreñv ar vamm hag an tad,
Nann, biskoaz, rag ar vugale
Ne garent nemed o skwer vad ;
Evel-se, buhez oll ar Breton
A oa didamall ha difre,
Hag en e dremenvan, heb aon,
E hede barnedigez Doue.

Bremañ gwir an den 'zo lakaet er reñk kenta,
Euz or Hrouer, avad, e naher ar gwiriou ;
Kement azen a gred eun den gouizieg beza,
Pa ne oar ket ped dant en-deus en e henou.

EUN NEBEUD FIZIAÑS

An heol a zo kuzet, hag ar menezioù glaz
A zo ruziet o lein gand liou ruz ar pardaez,
An oll mêzioù 'zo sioul, a-boan, war an hent braz,
Ma klever trouz eur harr, a-boan ma kren ar gwez.

An ed er parkeier a zo sonn en o za,
Med o fennou melen a lavar int dare,
Hag e rankint, warhoaz, dindan ar falz koueza,
Kerkent ha ma vezo goulaouet ar beure.

A-boan ma vez gwelet en Neñv eur steredenn,
Ma 'h en em zastumer en-dro d'an daol zero,
Abretoh ema koan, abretoh ar bedenn,
Rag warhoaz, mintin-mad, labour denn a vezo.

Ya, warhoaz, hag ohpenn pemzeg devez goude,
Ar hwezenn a ruילו diouz tal al labourer,
Euz e bouez e tle koll ugent lur, marteze,
Med daoust hag-eñ, d'an eost, a zell ouz ar skuizder ?

Nann... rag gand ma vezo klozet-mad er hrignol
Ar greun en-deus hadet, teilet ha dastumet,
Gand ma oar e vezo bara 'vid ar Frañs oll,
Micherour an dachenn euz e boan ne glemm ket.

O ! pa zellan ouzit, labourer va mignon,
Pa welan ez eus c'hoaz euz da seurt en or Bro,
E soñjan gand fiziañs : en despet d'al laeron
Ha d'an dispaherien, ar Frañs n'eo ket maro !

BOTREL

Klevet hoh-esu Botrel o youhal e zoniou ?
E glevet³⁰ hoh-eus c'hoaz o vuskana e werziou ?
Ne gan ket en or yez, e yez ar Vretoned,
Med e galon 'zo tomm hag e benn 'zo kaled ;
Bez'en-deus eun dremm leon, gand daoulagad eun erer,
Eun tal uhel, eur jestr braz,, eur vouez nerzuz ha kaer ;
Heb klask hentchou distro, e lavar krenn, heb aon,
Ar wirionez hepken, hag a-greiz e galon.
E-pad ma'z out yaouank, kan hep skuiza, Botrel,
Lavar d'ar Hallaoued eo c'hoaz beo Breiz-Izel,
E kar ar Chouanted atao kement o Roue,
Ha ne fell ket dezo nah o feiz hag o Doue.
Dezo lavar ohpenn ez eus c'hoaz en Arvor,
Gwazed dispart war zouar ha bleizi koz war vor ;
Ne garont let avad lamponed an dispah,
Herzel a raint outo warhoaz, kement ha deh³¹,
Kentoh eged lezel, a-zindan o skilfou,
Mouga feiz o zud-koz, goapaad o giziou.
Lavar d'ar Hallaoued e kar ar Vretoned
Frañs Sant Loiz, Duguesclin, kement hag i bepred,
Rag biken ar Zaozon n'o lako da blega,
Evel m'o-deus pleget i, deh, e Fachoda.
Lavar d'ar Hallaoued, pa vint skuiz a-walh
Gand o follenteziou, gand kleñved an dispah,
Ha pa vezint gwasket gand an enebourien,
Ez eus e Breiz-Izel tud a galon, a benn,
Ar re³² yelo d'an tan evid divenn Bro-Hall,
En despet m'o-deus soñj euz an dispah gwechall.

³⁰ E glevet : "Her hlevet" er skrid orin.

³¹ deh : "deah" er skrid orin. Stumm Leon, a rim gand "dispah".

³² Ar re : "Pere" er skrid orin.

ADARRE HOCHÉ

Setu *Hoche* an displeal, en a-raog adarre,
Dre re hlaz Breiz-Izel ! (ma'z eo gwir an dra-ze !)
Nann, n'eus ket eur Breizad hag a vefe dibenn
Da houlenñ e ve greet d'eun displeal eur skeudenn.

Ar re hlaz n'int ket gwir ouenn on tadou-koz,
O frezegenn 'zo yud hag o dremm a zo faoz ;
War digarez beza mignoned ar frankiz,
N'int nemed trubarded e-keñver o henvroiz.

Selaouit, Bretoned, an dud a ro skoazell
D'ar re, war o meno, 'zo re hlaz Breiz-Izel,
O-deus en o gwazied gwad an dispaherien,
Ha, dre ze, d'ar Frañs oll int gwir enebourien.

Ar re-mañ, da viken, 'zo gwerzet da Z/Dreyfus ;
Kollet o-deus o foan o labourad dre guz,
Rag e Breiz, e Bro-Hall, ez int bremañ barnet ;
E Brest, 'vel e Pariz, ne vezint mui kredet.

Harz ar re hlaz ! atao, Breiziz, va mignoned,
Ha ma'z eus tud pennfoll a-walh d'o darempred,
Chomit bepred nerzuz, dalhit ho kalon yah,
Ha lakit ar re ziod gand ar re hlaz, er zah.

EN A-RAOG, KATOLIKED

War don : *Dieu de paix et d'amour, lumière de lumière.*

Eun avel fall a hwez, skrijuz, war or bro garet,
Eun ampoezon marvel, beteg mel an eskern,
A vrein ar bobl a Frañs diouz feiz he zud-koz distroet
Gand priñsed an ivern.

En a-raog tud a feiz, en a-raog Katoliked,
'Eneb an enebour a glask or chadenna,
'Eneb ar Juzevien, 'eneb ar Frañmasoned,
Evid o diskara.

On Arme gallouduz, ha ken brudet a-viskoaz,
Bremañ zo disprizet, goapeet a beb giz,
Kollet gand o fiziañs, or zoudarded keiz, warhoaz,
A yelo war o hiz.

N'ez eus e neb leh mui, neb frankiz ha neb lealded,
Kement ti-barn a zo dindan galloud an aour,
Evid ar varnerien n'ez eus nemed daou dorfed,
Beza den leal, pe baour.

Or bugale gristen, ganet evid an Neñvou,
Er skoliou milliget³³ a deuy da nah o Doue,
Ne zelaouint, siwaz ! nemed mouez treiz ar youlou,
E-leh mouez an Ene.

Hebdale ne vo mui badiziant na dimezi,
Ouzom e vo prenet dor an oll ilizou,
E-giz relijion ne vo gwelet, e pep ti,
Nemed dañs an Ankou.

Re bell amzer eo bet chomet kroaziet on divreh.
Poent-braz eo d'an oaned koueza war ar bleizi,
Euz o fallagriezioù, Breiziz o-deus a-walh,
Hag euz o laeroñsi.

³³ Er skoliou milliget : ar skoliou laik (Ar skoliou dizoue !).

GWECHALL HA BREMAÑ

Gwechall-goz, e bro Hres, skridou kaer ar varzed
Gand paour ha pinvidig 'oa prizet dreist pep tra ;
Beb bloaz, e-kreiz eur gouel, e veze kurunet,
Gand lidou braz-meurbed, ar varzed ouizieka.

Dudiuz 'oa neuze gweled o tireded,
Niveruz hag a-bell, en o dillad kaerra,
Ar poblou, laouen-oll, gand ar c'hoant da gleved
Rimadellou dispar hag euz ar re goanta.

Neuze spered ar barz e peb leh a oa Roue,
N'eus forz pe halloud all a dlee dond goude,
Ya, neuze c'hoaz e ouie tridal ar halonou.

Oh ar varzed a Frañs e prener an diskouarn ;
A-walh eo gouzoud pignad war eur marh-houarn ;
D'an divesker hepken e vez savet prizioù.

A-RAOG

Or breudeur euz Tramor, euz gouenn ar Vretoned,
Dindan ar Zaozon griz, a ouzom, 'zo sklaved ;
Bretoned Vreiz-Izel ivez a rank diwall
N'en em gavfe ganto, marteze, kemend-all.
D'or frankiz an dispah en-deus roet eun taol braz ;
Da Roue Frañs on dugez Anna, pa zimezas,
A reas meur a varhad, touet, ha dre skridou,
Evid am ve da Vreiz dalhet meur a wir³⁴.
Hogen, ar Republik, frouezenn vreïn³⁵ al laherien,
Enebourez touet deom, labourerien,
En-deus, yud ha trubard e-keñver al lealded,
Freuzet kement marhad miret gand on Rouaned³⁶.
N'eo ket 'ta sebezuz he-defe Breiz-Izel,
On tadou Chouanted, gand nerz, klasket herzel
Oh ar Varianna direiz ; rag en eur goll o Roue
E kollent o gwirioù. Daoust ivez hag o Doue
Gand an dispaherien n'ez eo ket bet harluet ?
Daoust hag on Ilizou n'int ket bet dismantret,
Hag or gwir veleien, a grede chom er vro,
Redet evel gedon 'vid o has d'ar maro ?³⁷
Mad, evel d'an dispah e klasker a-nevez
Ober brezel d'or feiz ha goapaad or yez.
Ar re, war o meno, 'zo *re hlaz Breiz-Izel*,
Evel em-eus gwelet, a zigor ar brezel.
En deiz all e welen imaj louz Marianna,
War eul levr digristen, o tiskouez o para,
Moarvad, heol an dispah, a-dreñv d'or menezioù.
Hag ar goz loudourenn, glaourenn leun he genou,
E justin eur Breizad gand he hraban dehou krog,
A gred youhal dezañ or ger nerzuz « a-raog ! »
« A-raog ! » evid petra ? Lavar 'ta, loudourenn !
'Eneb d'he yez, moarvad, hag 'eneb d'he hredenn !
Rag imaj ar Breizad a zo, dre hoaperez,
Lakeet, e-harz e dreid, war e zaoulin ganez ;
Eur houlaouenn danet en eun dorn a welan,
Eur chapeled ohpenn en dorn all, a gredan,
Breizad, chom daoulinet 'vid achui da bedenn,

³⁴ meur a wir : "meur a wirioù" er skrid orin : fazi yezadur, bet greet dija gand Pronost.

³⁵ frouezenn vreïn : "frouez brein" er skrid orin.

³⁶ kement marhad miret gand on Rouaned : iskiz eo skriva eur seurt tra.

³⁷ Daoust hag on Ilizou n'int ket bet dismantret,

Hag or gwir veleien, a grede chom er vro,

Redet evel gedon 'vid o has d'ar maro ?

Faoz penn-da-benn ar pezh a skriv Pronost.

Godue 'vezi kreñfoh en eur zevel da benn ;
A wir galon goude, prim ha drant en da za,
Kri neuze : « En a-raog ! Bazed da Varianna ! »

KAN A VREZEL

Paotred Vreiz-Izel

War don son ar re hlaz : *La Marseillaise*

'Eneb Judaz, ar Frañmasoned
Hag oll dispaherien ar vro,
Savom drant en or zav, Bretoned,
Evid galloud herzel outo ;
En on touez, evel naered-wiber,
Eh en em ruzont niveruz,
Diwallom ouz o zeod flemmuz,
Ha flastrom, en eun taol, penn an naer.

Diskan

En a-raog, Bretoned, 'vid or yez hag or feiz,
Bazad d'an enebour a daol e droad e Breiz.

Gouenn an dud nerzuz hag a galon,
Biskoaz n'out bet eet war da giz :
Ne garez mui 'ta da frankiz ?
Ar gwad a red a-dreuz da wazied,
Daoust ha n'en-defe mui tommder ?
Da zorn na ve mui ken pounner,
Ma kren dirag an haillevodet ?

Petra ! tud fall leun a warizi,
A-du gand on enebourien,
E Breiz-Izel a deufe mistri,
A rafe deom al lezenn ?
Bugale yaouank ar Chouanted,
Kentoh eged divenn or bro
Ha reded d'an tan evelto,
A ve sugellet evel loened ?

Taolom er-mêz euz a Vreiz-Izel
An den difeiz hag an divroad,
En or bro na lezom ket sevel
Bugel ebed euz eur seurt gwad ;
E Leon, d'ar moh ne roer ket gwiniz,
Na sistr, e Kerne, d'ar bleizi,
D'o bro ni ray dezo distrei,
Breiz-Izel, oll, a zo da Vreiziz.

MARO AR JUZEO

En eur gambr louz, war eur holhed hanter-vrein,
Ar Juzeo kriz 'zo war-nes da vervel ;
War e yalh aour ; kuzet gantañ a-dreñv-kein,
Beb an amzer, gand aon, e taol eur zell ;
Med spes Lazar kerkent a zo dirazañ :
« Ar madou-ze, frouez euz da falloniou,
Eme Lazar, evidout, a welan,
Ne hallont ket prena buhez an Neñvou. »

Diskan

Hag evdi klask, pellaad ar wgel skrijuz,
Eh astenn prim e zivreh laosk ha treuet³⁸,
E zaoulagad, da weled, a zo spontuz,
E zent a stlak evel pa ve daonet.

Gwasket bremañ dindan pouez e dorfejou,
En e houzoug ar gomz a jom mouget,
Kerkent e wel c'hoaz o tond a-vandennou,
Ar re gwechall en-deus bet kastizet :
Bugaligou, mammou keiz, hanter e noaz,
En-deus taolet er-mêz euz e lojenn
Skrijal a ra, rag, war-laez, e kred, siwaz !
Gweled ivez eur hleze dreist e benn.

Evid achui, war dachenn ruz an emgann
E wel breudeur en o gwad astennet ;
Na pebez spont ! krial oll 'reont warnañ :
« Trubard ! trubard ! en-deus bet on gwerzet. »
Dre ma kront, en e wazied hag eskern
E kred e rinkl³⁹ preñved, en eur grignad,
Kaoud 'ra dezañ e kouez e puñs an ivern,
Hag er flammou beza devet evel Koad⁴⁰.

³⁸ treuet : treutaet.

³⁹ rinkl : ?

⁴⁰ Koad : Bet skrivet "Coat" er skrid orin. Notenn gand Pronost : "Ar Protestant euz Tremel".

AR BEORIEN ER HÊRIOU

Koumoul loued ha pounner a zo, leun an Neñvou,
Euz an oll diez e kêr ez eo gwenn an toennou,
An amzer a zo yen, hag a dammou ledan
An erh, gand an avel, a nij evel gwenan.
E-barz en eur vantell, spillennet dreist ar penn,
An neb en eun davarn a gar chom a-ziaskren,
Ne da ket en noz-mañ da reded ar ruiou,
Ha mond a ra d'e gambr, prim-meurbed e baziou.
Med e-pad ma kouez puill an erh, heb ehana,
E-kreiz eur pondalez, en eur huanada,
Ez eus eur paour-kêz koz, heb tan hag heb goulou ;
Med den ne zoñj ennañ, den ne glev e glemmou,
Rag ar fals pinvidig, kousket tomm hedale,
A ra fae war an neb n'en-deus ket a wele.
Evel-se, d'ar mintin, pa deu troad e vatez
Da vale war eur horv a-dreuz ar pondalez,
E lavar, o floura gand an dorn e varo :
« Eur vad en e geñver en-deus greet ar maro ! »
Euz a diez ar re glañv ar skolaerien⁴¹, d'ar red,
A gouez war gorr ar paour ; a-raog mond d'ar vered,
Evel eun aneval, ar horv gand ar re-mañ
A zo digoret-oll ; o daouarn, hep krena,
A deu da zizolei kalon ha bouzellou ;
Goude beza warno taolet mad o zellou,
En eru weled n'eus ket a voued er vouezellenn :
« Marvet eo gand an naon ! a zoñj ar skolaerien.
A-boan ar gigerien o-deus greet o labour,
Ma teu karr an ankou, karr bered ar re baour ;
Ar horv, bremañ stripou, 'zo stlapet en arched,
Heb na ve, war hemañ, kurunenn na boket ;
Na kerent, na mignon, war-lerh, en eur ouela,
N'eus nemed pevar den, paeet evid hen bezia,
Ar re⁴² ya, laouen-oll, a-hed hent ar vered,
Heb doujañs hag heb feiz, en eur ziviz bepred.
Kerkent war ribl an toull, digor en eur hogn-tro,
Ar re-mañ, d'hen diskenn a zo mall-braz ganto,
Ha den, en eur dremen, ne lavaro warhoaz,
Piou 'zo beziet eno, rag n'eus ano na kroaz !

⁴¹ skolaerien : studierien (?)

⁴² Ar re : "Pere" er skrid orin.

E SKOL VA FARREZ

A-boan ma 'oa ken uhel ha botez eun archer,
Ma'z oan kaset d'ar skol evid deski galleg,
Rag euz ar yez-se c'hoaz ne ouien ket eur seurt ger,
Ne ouien evel va mamm, nemed ar brezoneg.

M'ho-pije va gwelet diskabell ha diarhen,
Oh en em gaoud er skol, oll ho-pije c'hoarzet,
Va genou, digor-braz, e peb leh e sellen,
Gand em fenn daoualgad eur bugelig dianket.

Reñket ouz eur voger, evel ar zoudarded,
Tro-war-dro d'an ti-skol, me 'wele taolennou
Warno livet e du pep seurt anevaled
Gand an aotrou skolaer⁴³ anvet lizerennou.

Med ne jomis ket pell eur hrouadurig gouez ;
Soñjezonou nevez a deuas buan em spered ;
An anevaled du, kentoh eged⁴⁴ eiz devez,
A oa deuet da veza va brasa mignoned.

Ma vijen bet ken fur ha m'oan mad da zeski,
N'em-bije ket skubet an ti-skol d'ar pardaez⁴⁵,
Med evel m'oan dibenn, ha ma karen c'hoari,
Em-eus skubet, siwaz ! leur an ti-skol aliez.

Biskoaz n'em-eus klemmet o chom e pinijenn
Da houde beza greet eur farserez bennag,
Leñvet em-eus avad o kaoud ar zimbolenn
Evid komz brezoneg ; goulenn a rit perag ;

Ra zigoro Sant Per din dor ar baradoz,
M'em-eus hen gounezet dre gement a zaelou ;
Med penaoz pardoni d'an aotrou skoaler koz
D'am beza kastizet 'vid komz yez on Tadou ?

⁴³ an aotrou skolaer : Notenn gand Pronost : "ar mestr-skol".

⁴⁴ eged : "hag" er skrid orin.

⁴⁵ N'em-bije ket skubet an ti-skol d'ar pardaez : ar vugale bet puniset, evid tra pe ra, evel komz brezoneg, a dlee skuba ar skol d'ar pardaez.

AN TEOD FLOUR

Bugel, bez war evez, dreist-oll ouz an teod flour
A lavar ez eo mad ar pezh a rez fall,
N'ez eus ket war an douar eur brasoh enebour⁴⁶,
Ma n'out c'hoaz nemed born, hemañ da lako dall.

Ma'z eo bet, e Kana⁴⁷, distroet e gwin an dour,
N'eo ket eun den er bed a rafe kemend-all ;
'Vel eur hillog, eta, gwintet war beg eun tour,
Ma troez gand peb avel, ouz an teod flour, diwall.

Rag hennez, a-dreñv-kein, hebdale da werzo,
Muih-mui, dirazout, an trubard a vezo
Beb gwech a-du ganez, 'vid gwelloh da blega.

Setu perag, kerkent m'eh-eus en em faziet,
Kred an neb a lavar krenn, hep troidell ebed,
Hag eñ, e gwirionez, eo da vignon gwella.

⁴⁶ eur brasoh enebour : eun enebour brasoh.

⁴⁷ Kana : "Cana" er skrid orin.

JÃÑNED

Pa yeas Jañned e kêr, n'he-doa nemed koefou,
Med evid heul ar hiz e tougen tokou.

Gand Jañned,ken nebeud, n'oa nemed eul lostenn,
Kemered a reas diou, ruz unan, eben gwenn.

He herhenn 'oa ken euz a-zindan he sae hloan !
En em waskell a reas evid kaoud kerhenn moan.

E brezoneg hepken e kane kantikou,
En eur galleg divez e kan bremañ soniou.

Kleved a ree bep sul overenn, gousperou,
Hogen ar zul bremañ 'zo roet d'an ebatou.

Yann, ne dalv mui gouela Jañned da zousig koant,
Rag e kêr-veur Pariz e kav gwazed, dre gant.

Med hebadle 'weli Jañned, war or mêziou,
Roufennet 'raog an oad ha goloet a druillou.

PATATEZENN VIEL

Anavezet hoh-eus Biel ?
Ya, Biel ezu ar Hozkastell ?
Er skol eo bet chomet pemp bloaz,
Heb n'en-defe gallet biskoaz
Ar skolaer lakaad en e benn,
Stag-oh-stag, peder lizerenn.
Evel-se pa'z eas d'an arme
'Oa truezuz-meurbed e zoare.
Rag kaer en-doa klask ober mad,
Digeri braz e zaoulagad,
E teue da zevel a-wechou
E zorn kleiz e leh e zorn dehou.
Al lamponed Parizianed
A gav abeg er Vretoned ;
Ha diwar-benn Biell, bemdez,
E reent a bep seurt farserez ;
Dreist-oll, eur hoz tamm lakepod
A oa c'hoaz flemmusoh e deod.
A-benn eun nebeud miziou
Biel a zeskas meur a her⁴⁸.
Hogen er hazarn, eun devez,
Edod o kignad patatez.
Hag ar Parizian da gana,
O hoapaad, an diskan-ma' :
*« Ar patatez 'vid al loened
Hag ar hrohenn d'ar Vretoned ! »*
Ruzder a deuas e penn Biel ;
Hag eñ da daoler eur gwall zell
War eur batatezenn bounner,
Ha, da houde, war ar goapaer
Biel euz ar batatazenn
A zalhas gantañ ar hrohenn ;
Med ar batatazenn gignet
Kerkent gand Biel a zo stlapet
Oh genou braz al lakepod,
Ken kreñv, ma chaokas beg e deod.
An oll zoudarded a hoarze
Ha, d'e dro, Biel a gane :
*« Ar patatez evidout-te
Hag ar hrohenn evidon-me ! »*

⁴⁸ meur a her : er skrid orin, "meur a heriou", fazi boaz gand Pronost.

AR BARZ HAG E VINIOU

War ribl an hent, e-skeud an deliou
 Poultrennet euz ar harz,
Mantret ha beuzet en e zaelou,
 Em-eus gwelet ar barz ;
E dal a oa teñval ha soublet,
 Ha gand eur vouez truezuz
E roas, hebdale, din da gleved
 Ar homzou-mañ klemmuz :

Diskan

Bremañ, siwaz ! ne vez mui kanet,
E Breiz-Izel, gwerziou, soniou,
On amzer gaer a zo tremenet,
Marvom eta, paour-kêz biniou !

Soñj eh-eus, gwechall ar Vretoned
 A galon a oa gae,
Hag er pardon koulz hag en eured
 An dud oll a zañse ;
Me, gand va mouez, ha te, gand da zon,
 A skuille levenez,
Evel an heol, e-barz er galon
 Tener an den-nevez.

Evid galleg draillet eun hanter
 E lezer ar yez koz,
D'en em vezvi, da zul, e chomer
 Er bourk beteg an noz ;
E-leh dañsal hag e-leh kana,
 An dud yaouank, hirio,
Ne ouzont mui nemed azeza
 Da hoari domino.

Ne garom nemed yez Breiz-Izel
 Biniou, va mignon ker,
E-touez Breiziz, ma teu da vervel,
 Petra 'hallfem ober ?
Doue ra viro n'o-defe keuz braz
 D'ar barz ha d'e viniou,
Sklaved 'vezint ma kollont, siwaz !
 O yez hag o giziou.

Med, petra 'lavar mouez an hekleo,

War eun ton kaer-meurbed ?
Kleved a ran, e yez c'hwek ar Vro,
O kana c'hoaz barzed ;
Daoust ha Gwened, Leon, Treger, Kerne
En em glev evid herzel,
Daoust e vez dihunet adarre
Spered koz Breiz-Izel ?

Diskan diweza
A ! m'eo gwir e tle beza kanet,
E Breiz-Izel, gwerziou, soniou,
On amzer gaer n'eo ket tremenet
Hag e vezim c'hoaz, va biniou !

AMZER GOLLET

Evel eun huñvre kaer, evel eul luhedenn,
Va yaouankiz a zo tremenet da viken,
Hag evelti, bremañ, levenez ha frankiz
A zo nijet a-bell, heb mui dond war o hiz.

Setu perag, siwaz ! euz an nevez-amzer
Ne hallin mui kared an deveziou ken kaer,
Ar bokejou n'int ket, a gav din, ken skeduz
Ha kan al laboused n'eo mui ken dudiuz.

Euz an diskar-amzer an deveziou teñval,
Ar mor braz e kounnar, an avel o yudal,
A blijo d'am spered leun a deñvalijenn
Ha d'am halon beuzet er glahar, eun anken.

Perag em-eus klasket en em zével ken uhel,
Evid koueza dioustu, torret va diouaskell ?
Feiz, kalon ha frankiz, an aour a zo brema'
Gand Satan, mestr ar bed, c'hwi ne dalvit netra.

Ne glasken koulskoude nemed ober ar mad,
Digeri d'am henvroiz muioh o daoulagad,
Hogen gwell eo ganto selled oh an tu kleiz
Ha mond, diod ha dallet, war-lerh an ddu direiz.

Nahet o-deus, siwaz ! o zadou Chouanted,
Euz ar re Hlaz, o mez ! e reont o mignoned !
O Bretoned ! dre druez, na nahit ket ho pro,
Evel ho tadou-koz kit kentoh d'ar maro.

AR GROAZ, TREH ATAO

Euz ar sklavaj m'oe bet diframmet ar poblou,
M'eo deut ar garantez e leh ar gasoni,
M'eus levez e leh n'oa nemed an daelou
Ha m'eo dleet lezel e wir gand pep hini.

Eo dre m'en-deus Jezuz, gand e brezegnnou,
Trehet ar bed pagan, mouget ar warizi,
Ha dre m'en-deus, gwelloc'h c'hoaz eged dre gomzou,
Skuillet, dre garantez, e wad evidom-ni.

Med eun ober ken kaer ne blij ket da Zatan,
Er bed kristen n'eo ket mestr 'vel er bed pagan,
Setu perag e klask, a-nevez, deskibien.

Kavet en-deus e hoant ; rag ar Frañmasoned
O-deus touet da rei, da Briñs an droug, ar bed ,
Med eur Hrist frañmason ne vo kavet biken !

TREFLEZ HA STER AR ZEAZ

Treflez, pelezenn *Leon*, ken koant gand ster ar *Zeaz*,
Gand eun aot ken ledan, leun a reier, a dreaz⁴⁹,
Siwaz ! gouela 'ran c'hoaz an amzer dremenet,
Amzer va yaouankiz, evid atao nijet.
Bugelig, war an aot pa reden, skañv, diarhen,
En eur daoler en êr, er mor, mên ha krogenn,
E chomen en eun taol, 'vel eun den, da zoñjal,
O weled eul lestr-tan o tremen er penn all ;
Rag en despet d'am oad, ar c'hoant braz da weled
Ar pez a oa larkoh a skuize va spered ;
E fraillou reier uhel an avel o yudal,
A-uz d'an houlennoù laboused o krial,
Ar goabrenn a stoke, du-hont, oh ar mor don,
Pep tra deue da lakaad da dridal va halon,
Hag eur vouez, treiz moarvad, a grie din atao
Kimiada diouz *Treflez* ha mond da reded bro.
Ster ar *Zeaz*, me gare, ken sklêr ez oa da zour,
Dond da zelled ennout, evel er melezour,
Evid gweled va skeud, ken koantig o krena,
Pa deue gand an avel an dour da roudenna !
Hogen, e ribl ar ster evel e ribl ar mor,
D'ar vouez treiz me 'zalhe, siwaz ! va skouarn digor ;
Ar c'hoant braz da veza brudet ivez eun deiz
A gemeras gwriazienn, ken don, e-barz em hreiz,
Ma n'am-oa ket gallet outañ pelloh herzel,
Ha me da vond en hent, digor va diouaskell.

O mouez ! te'lavare : « bugel leun a spered,
Evid chom er vro-mañ n'out ket hepken ganet,
Da ouiziegez eun deiz a dle rei dit ar brud,
Ha lorheg ahanout 'vezo Breiz ha da dud. »
O ! pegement 'oan diod, o soñjal e hallfen,
Evel ar pinvidig, paour-kêz, sevel va fenn,
O soñjal 'oa bremañ gwelloc'h tud war an douar,
Hag e tegemeret oh taol ar paour *Lazar* !
Gevier oll kement-se ! rag e-barz ar hêriou
Em-eus gwelet atao *Lazar* war an treuzou,
En despet d'e hlahar, ar pinvidig, a-boan
Ma taole, gand dispriiz, e zaoulagad warnañ ;
Dirag an aour ivez, priñs gallouduz ar bed,
Ar barner a stoue, troet e gein d'al lealded.

⁴⁹ a dreaz : a drêz. Stumm Leon, bet miret evid ar rim.

Mouez, te 'lavare c'hoaz, em heñver atao treiz :
« Kemer telenn ar barz, heb ehan kan e-leiz
Ar garantez dispar, ar feiz hag al lealded,
Hag e vezi meulet e peb leh, ha bepred. »
Siwaz ! va hanaouenn 'zo chomet heb hekleo ;
D'ar re lorheg ha diod va han 'oa re haro,
Ne hallen ket kana 'vid c'hweza youlou fall,
Na mougva va hounnar dirag eun dra displeal.
Setu perag, atao, daelou puill a skuillan,
Er paour-kêz barz *Gilbert*, em gwalleur, pa zoñjan.

Telenn, va mignonez, perag chom er hêriou
El leh n'eus Doue, nemed an aour hag ar youlou ?
D'am bro *Treflez*, ganez, me 'fell din mond raktal ;
Eno ni 'gano c'hwek, pa glevim o voudal,
E menez an *Toupet*, eun avel yah er gwez,
Hirvoud dour ster ar Zeaz a-dreuz haleg *Pontlez*,
Ha du-hont, en aot vraz, e-harz tevenn *Arvor*,
A-dreuz ar reier uhel, krozmol an tarziou mor.

VA MAMM

En eur zoñjal em yaouankiz
Hag em bro gaer ha karet,
E taolan eur zell war va hiz,
Gand eur galon hlaharet ;
Gweled a ran, noz ha beure,
E lojennig ar menez,
Va mamm, evid he bugale,
O pedi gand karante'.

Pa vez dister ar bugelig
Ez eo diêz-braz da zevel,
Me 'oa, siwaz ! gwall reuzeudig,
Atao war-nes da vervel ;
Da va disterra klemmadenn,
Va mamm a veze gwelet,
He halon beuzet en anken,
En eun taol, o tereded.

E-kichenn va havell aliez
(Me 'gav he gweled c'hoaz)
Pell-braz e veze war evez,
Heb en em skuiza biskoaz,
Ya, beteg ma vije prennet
Gand va housk va daoulagad,
'Hed an noz e vije chomet,
Atao dihun, va mamm vad.

Nag a gerent, a vignoned,
On-eus karet war an douar !
A-boan er-mêz euz ar vered,
M'on-eus mouget or glahar ;
Med, da viken 'barz em halon,
Eun dra 'jomo gwriziennet,
Bepred don-braz : ar zoñjezon
Euz va mamm vuia-garet.

AL LABOURER O VOND D'E DACHENN

War don : *A-vihanig em-eus pehet.*

An erh a zo deut da deuzi,
Ha kerkent, en oll prajou,
Ar yeot da zevel a-zevri,
Da ziwan ar bokejou.

Al labourer, drant en e za,
A zigor dor e lojenn,
Hag al laboused, o kana,
Hen galv da vond d'e dachenn.

Al labourer ivez a gan,
Rag e galon 'zo laouen,
O kerzed a-dreuz ar balan,
E mogidell an draonienn.

Ar werelaouen lugernuz
A jom, beteg ar beure,
A jom, beteg an Anjelus,
Da gomz dezañ euz e Zoue.

Da houlou-deiz, an alhwedez⁵⁰
A nij uhel dreist ar mêziou,
Pedenn al labourer ivez
A zao beteg an Neñvou.

Ha nerzusoh gand e bedenn,
'Hed an deiz, al labourer,
A labour kement ha daou zen,
Hep soñjal en e skuizder.

Evel-se me lavar deoh :
« Na dit biken war-zu kêr,
Rag n'ez eus den eürusoh
Eged al labourer-douar. »

⁵⁰ an alhwedez : an alhwerder.

AR HONIKL

En eur waremm alaouret
Gand bleun melen al lann,
Ar honikl a zo ganet
Etre daou skourr balan ;
Puchet ez eo ken braoig
War eur gwele raden,
Hag e benn 'zo ken koantig
Gand daoulagad melen !

Her gweled 'ran a-wechou,
Kerkent deuet ar beure,
O reded er hrinennou,
Ken seder ha ken gae !
Mad a ra lammed, c'hoari,
P'en-deus, evid netra,
Ar yeot tener da zebri,
Ar gliz evid eva.

Eüruz e-pad c'hweh miz,
E-kreiz e rouantelez,
En-desu bevet e frankiz,
Heb anaoud an enkrez ;
Hogen eun devez, siwaz !
Evitañ pebez gwall,
En e waremm pa glevas
Eur rumm chas oh harzal.

Bremañ n'eo mui ken kuzet
E-touez ar bodennou,
Ar chas o-deus hen c'hwezet
Emaint war e roudou ;
Dreist ar hleuz, evid tehed,
E lamm er wenodenn,
Kerkent ez eo diskaret,
Maro-mik, gand eun tenn.

Ema war daol ar higer
Ar honikl, evid mad,
Astennet e zivesker⁵¹,
Teñval e zaoulagad ;
Achet en-deus da lammed,

⁵¹ e zivesker : peder garr en-deus !

Hag e-verr, evid koan,
E vo poazet ha fritet
War ar billig-vihan.

AR GOUKOUG

Diskabell evel diarhen,
Bugelig pa reden
Er hrinenn leun a vokejou,
Va halonig a dride,
En eur wezenn pa gane
Rouanez ker an hañv, ar goukou'.


Ouz breh va muia-garet
A dlee beza va fried,
Pa zistroen euz ar pardonious,
Va halon, kreñv, a lamme
Em hreiz, beb gwech ma kane
Rouanez ker an hañv, ar goukou'.

Med abaoe, war an douar,
Em-eus bet meur a hlahar,
E-kreiz ar grevusa poaniou ;
Dilezel a ran va foan,
En eur mare, pa glevan
Rouanez ker an hañv, ar goukou'.


Euz a wezenn da wezenn,
Koukoug, laosk da ganaouenn,
Dindan an neñvou ken skeduz ;
D'ar galon e levenez
Ha d'ar galon en enkreuz,
Da ganaouenn 'zo dudiuz.

KARANTEZ AR VRO

KARANTEZ AR VRO



Va bro ga ret Treflez Per le zenn gaer Breiz-I



zel El leac'h ma'zounn ga .net El leac'h ma Kar fenn



mer vel Enn eur goll va fran Kiz Eunn



der vez em euz Siou az Ki mia del diouz das



ster da de venn da vor braz.

Va bro garet Treflez, perlezenn gaer Breiz-Izel,
El leh ma'z on ganet, el leh ma karfen mervel !
En eur goll va frankiz, eun devez em-eus, siwaz !
Kimiadet diouz da ster, da devenn, da vor braz.

Bez' ez on kastizet evid ken braz follentez,
Em spered, em halon, mui n'ez eus a levenez,
Ha gand keuz diwezad, en eur ouela noz ha deiz,
Meur a wech e tistroan war-zu va yaouankiz.

Gweled 'ran va zi-soul, va breudeur, va hoarezed,
Gand va zad ha va mamm, bodet en-dro d'an oaled,
Hag e-pad ma vez hir, 'hed ar goañv, an nozveziou,
Dirag eun tan balan oll e kanom gwerziou.

Gweled a ran ivez ar gelerenn er prajou
Hag ar gorriganed o lammed er menezioù,
Kleved 'ran ar sabat e-barz en dachenn dosta
Hag ar gannerez-noz e *Pontlez* o kanna.

Setu deuet ar zadorn a-raog sulvez ar Bleunioù ;
Da venez an *Toupet* ez a ar vugaligou,
Skourrou pin gand teir boul, evid an overenn-bred,
A deu da goueza stank e daouarn ar baotred.

Setu c'hoaz ar mare 'vid ar foenn hag ar medi ;
Labourad a reer stard ha kalz e ranker c'hwezi,
Med da noz ar peurzorn e leunier ar gwerennou
Ha dindan ar stered e sao kanaouennou.

Da houde gousperou, pa deu miz ar hraoñ-kelvez
Paotred ha paotrezed a ya da goajou *Koadlez* ;
Ar hodell 'zo ken leun ha ken pounner ra vruched,
En eur zistrei d'ar gêr, ma vez beh o reded.

Evel-se kement soñj euz va blaoveziou gwechall
A laka va halon, en eur mare, da dridal,
Med an huñvre 'zo berr, heñvel ouz eul luhedenn
A weler o fiñval, eun nebeud, er goabrenn.

Va bro garet Treflez, perlezenn gaer Vreiz-Izel,
El leh ma'z on ganet⁵², el leh ma karfen mervel !
Evidout e vezo va diweza soñjezon,
Rag ne varvi biken em spered, em halon.

⁵² ma'z on ganet : galleg, bet deuet da veza boaz : ma'z on bet ganet.

TEHIT DIOUZ AR HÊRIOU

Hirio, kalz a labourerien
A lavar adie d'o zachenn ;
War ar mêz eo ken fall an traou
Ma'h en em daolont er hêriou ;
N'ez eus, emezo, war ar mêz,
Da zebri nemed yod gand lêz,
Eun tamm bara pounner ha fall,
Duoh eged ar siminal.
Hogen e kêr, da vihanna,
Ez eus boued skañv, gwennoh bara⁵³,
Soubenn zruz, rata mad ha gwin,
E leh dour ha soubenn irvin,
Eur bae vraz ha nebeud a boan,
Netra d'ober da houde koan,
Rag chatal ebed da goania,
Lann da bilad, kraou da garza...
Med, me 'lavaro, mar kirit,
Tud keiz, eh en em faziit ;
Gand eiz real, ha zoken eur skoed⁵⁴,
N'ho-pezo ket a gig bep pred ;
Aliez, gand eun añtrepreneur,
Nemed eiz real ne hounezer,
Goude c'hoaz, evel forsaled,
Labourad pell-braz ha kaled.
Ohpenn, da zul, da houel, aliez,
E tleer labourad ivez ;
Overenn ebed a-wechou,
Nebeutoh c'hoaz a housperou,
Hag e-touez ar vañsenourien,
Arabad, o sevel ho penn,
Komz a Zoue nag euz ho feiz ;
C'hoarzet e ve deoh, tud keiz !
Ar homzou louz hag ar sakreou,
Eo relijion ar hêriou.
Evel-se, chomit war ar mêz,
Rag gwelloh eo yod kerh gand lêz,
An êr vad gand kalz a frankiz,
Bered ho tud hag hoh iliz.

⁵³ gwennoh bara : stumm iskiz : bara gwennoh.

⁵⁴ Gand eiz real, ha zoken eur skoed : eiz real = daou lur ; eur skoed = tri lur.

AR VRAE HAG AR BALUHENN

Ar vrae nevez lememt gand gwer
A zo da Yann al loh all ;
Harpet eo gand daou vên pounner,
Evid na hallfe fiñval.

Rag Yann, en-deus divreh ken teo,
Ken nerzuz ha limoniou ;
Dirazañ, braerrien ar vro
N'int nemed bugaligou.

Med hirio n'eo ket eur gwaz
En-devezo da hourin⁵⁵,
Rag el leur, ivez, setu Soaz,
Deuet, adaleg ar mintin.

A-haoliad war he faluhenn,
Soaz a zalho penn da Yann,
Rag kerkent braet ar stehenn,
Paluhet ez eo ken buan.

Yann, o weled eo gleb e dal,
A daol e dok gand kounnar ;
Koef Soaz ivez a ya raktal,
Evel an tok, prim d'an douar.

An heol a deu tommoh-tomma ;
Yann a ziskar e justin,
Ha korv-sae Soaz, kerkent ha tra,
'Zo stlapet war ar bern lin.

Ne jom mui nemed eur zehenn,
Gand Yann nemed e vragez,
Ha gand Soaz nemed he lostenn.
Pebez gwaz ! Pebez maouez !

⁵⁵ da hourin : da houren.

AR ROZELL

War don : *Son ar hafe.*

Pa zistroas Fañch d'e vro,
Ne ouie mui brezoneg,
Ne ouie, war e veno,
Nemed chaokad galleg.

Edod gand ar gwiniz,
El leur, p'en em gavas,
Hag evel eur bourhiz,
Fañch, lorheg, a stouas.

Hag an oll sebezet,
Dirag kemend a stran,
Buan-ha-buan da reded
Evid diviz gantañ.

D'ar genta prezegenn
E klask digareziou
En eur hejal e benn,
Digor-braz e henou.

Ne hallan ket kredi,
A lavare Biel,
Mastin, ne ouifes mui
Ano forh pe rastell.

Lavar da vihanha,
En eur glask en da benn,
Petar 'halver houma'
Greet gand eun tamm plankenn ?

Fañch a stok er blankenn,
Oh ober arveziou,
Ha troad ar benveg, krenn,
A lamm ouz e henou.

Neuze Fañch e kounnar,
Dioustu da lavared,
Oh he zaoler d'an douar,
« *Sapre rozell daonet !* »

Ar Rozell a ziskouez,

Da gement den lorheg,
Ne dleer ket kaoud mez
O komz e brezoneg.

D'AR WENNILI

War don : *Êlez ar Baradoz.*

Lavar, gwennili vihan,
Euz a beleh e teuez,
Amañ, kemer eun ehan,
Komz a fell din ganez,
Euz va bro muia-garet
Degas a rez kelou ?
Va halon a zo rannet,
Ha skuill a ran daelou.

Rag adaleg ar mare
M'em-eus, o follentez !
Evid kêriou ken dizoue,
Dilezet va farrez,
'Hed an noz hag 'hed an deiz
Ne ran nemed soñjal
Em zi-soul hag em henvroiz,
En amzer gaer gwechall.

E-touez ar bobl hag an trouz
Va fenn a zo torret,
Heñvel on ouz eul labous
Lakaet en eur gaoued ;
Dond a ran da gastiza,
Gwennaad 'ra va bleo,
Beh em-eus o chom em za,
Dem-zost eo va maro.

M'em-bije, va gwennili,
Evel dout diouaskell,
Me 'nijfe kerkent d'am zi ;
Eno ve kaer mervel ;
Rag e bered va farrez
Eüruz ve beza
Beziet, beteg an devez
Euz ar varn diweza.

VA BRAGEZ

D'ar zadorn a-raog ar Bleuniou,
A-vandenn, ar vugaligou,
Kerkent ha m'oa peder eur skoet,
A veze gwelet o reded
Etrezeg eru hoad a wez pin,
Rag pep hini, d'ar zul vintin,
A felle kaoud, da vihanha,
Eur skourr pin evid benniga,
Eur skourr kaer, gand teir boul e kroaz ;
Med tizoud ar skourr n'oa ket eaz⁵⁶
Hogen , c'hoarvezet 'oa ganen,
O pignad oh beg ar wezenn,
Eun dra skrijuz-meurbed, eun dra
Hag am lakaas buan da grena.
Va bragez, er skourrou speget,
En eun taol-kont 'oa gwall-roget ;
Eur bragez nevez-flamm, ken kaer,
Ha trohet er gwella mezer !
Eur bragez, gand roudennou gwenn,
Prenet e marhad Lezneven !
Va skourr, gand e deir boul e kroaz,
A deuas da veza ker, siwaz !
Rag kerkent war dreuzou va zi,
Setu va mamm, droug braz enni,
D'am gourdrouz, ha zoken, ohpenn,
D'am skei kement gand ar gordenn,
M'oa bronduet-oll va divesker.
Ha setu perag ar paotr Per
Abaoe, da zul ar Bleuniou,
E leh eru skourr pin gand boulou,
Ne zoug mui nemed eur skourr beuz,
Êsoh da dizoud ouz ar hleuz.

⁵⁶ eaz : êz. Stumm Leon, bet miret evid ar rim.

SON

Avelig an abardaez,
Euz Breiz-Izel dond a rez,
Da gomz din euz va bro garet ?
Daoust e Breiz ez eus atao
Brug, balan ha gwez-dero,
Tud kaloneg, pennou kaled ?

Da guz-heol, er strêjou don,
Klevet eh-eus bet eur zon,
War eun ton an dudiusa ?
An dud yaouank, 'vel gwechall,
Gwelloh eo ganto dañsal
Eged chom er bourk 'vid eva ?

Gwelet eh-eus bet ivez,
E lojennig ar menez,
An hini gwachell a garen ?
Daoust ha soñj he-defe c'hoaz
Euz or yaouankiz, siwaz !
Tremenet 'vel eul luhedenn ?

Daoust hag e korn an hentchou
An oll, dirag ar hroaziou,
Heb kaoud mez a ra sin ar groaz ?
E kalon ar Vretoned
Ar feiz koz n'eo ket mouget,
Daoust ha ken kreñv e vefe c'hoaz ?

Tud ha mêziou Breiz-Izel
N'int ket mui, siwaz ! heñvel,
Nag en Arvor, nag er Menez ;
Evel gwechall-goz, hirio,
Ne zalher ket en da vro
D'ar giziou, d'ar feiz ha d'ar yez.

PRIZONIET

PRIZOUNIET




Klem mit Klem mit Klem mit dou



ri gou ster Pountlez enn eur re det a-dreuz ar



raoz hag ar c'hres soun Rag er bloaz-ma siou



az! ne d-innket da Dre flez e keare-kreizann



trouz e rank chom ho mi gnoun.

Klemmit, klemmit, klemmit, dourigou ster Pontlez,
En eur reded a-dreuz ar raoz hag ar hreson⁵⁷,
Hag er bloaz-mañ, siwaz ! ne din ket da Dreflez ;
E kêr, e-kreiz an trouz, e rank chom ho mignon.

Soñj hoh-eus, warlene, d'an abardaez ez een,
Evid gwelloh huñvreal, aliez e ribl an dour,
Hag e welen va skeud, ivez skeud eur pont mên,
Ken frêz e-barz ar ster hag er melezour.

Evel p'oan bihanig, va halon a dride,
Perag ? Ne hallfen ket avad hen lavared ;
Eul levenez ken braz er galon, en ene,
E komzou nag e skrid ne vez ket displeget.

O weled ar frankiz a gollan er bloaz-mañ,
Teñvalloh ha strisoh e kavin va frizon,
Noz-deiz va daoulagad n'ehanint da ouela
En eur zoñjal er ster, en tevenn, er mor don.

O ! perag e rankan beva pell diouz va bro ?
Rag me 'blij din kement c'hwez ar bezin, ar foenn,
An avel zall ha c'hwek euz an tevenn a zao
Hag a zo ken yahuz d'ar galon ha d'ar penn !

Klemmit, klemmit, klemmit, dourigou ster Pontlez,
En eur reded a-dreuz ar raoz hag ar hreson⁵⁸,
Hag er bloaz-mañ, siwaz ! ne din ket da Dreflez ;
E kêr, e-kreiz an trouz, e rank chom ho mignon.

⁵⁷ ar hreson : (galleg) : beler.

⁵⁸ ar hreson : (galleg) : beler.

EN DISTRO DA VREIZ-IZEL

Gand eur galon rannet ha kazi displett,
E teuan d'az kaoud, va bro ger Breiz-Izel,
Douar an Arvor em-eus eun deiz dilezet,
En eun taol-penn, evid reded a-bell ;
Soñjet em-oa gounid eun devez, d'am zro,
Eun ano braz hag e peb leh brudet,
Siwaz ! gwelloc'h e ve bet din chom em bro,
Atao dinamm, eüruz ha kuzet.

Rag er hêriou, dirag an dud hallouduz
Em-eus kanet noz-deiz, med heb hekleo,
Ha glaharet, en eur skuilla daelou druz,
E teue din soñj euz douar ar gwez-dero ;
Nag a bed gwech, evid mouga va foaniou
Em-eus ivez, evel eun den nehet,
Klasket kana goustadig gwerziou, soniou !
Ankounac'haet, siwaz ! 'oant em spered.

Neuze, mantret, 'on en em lakaet en hent ;
Bro Vreiz-Izel, truez 'vid ar mab dianket !
Rag me fell din dond da vugel evel kent
Ha nevezi va feiz hanter-vouget ;
Evel gwechall, va halon yah a-nevez,
E redin skañv ha gae dre da vêziou,
A-dreuz ar brug, e-touez balan ar menez,
E-tal an aot hag en da draoniennou.

D'AR PARDAEZ-NOZ

Pa vez kuzet an heol a-dreñv d'an torgennou,
Me 'gar mond da bourmen, sioul, a-dreuz or mêziou.

Kleved 'ran er waremm kanaouenn ar grilled
D'an hini⁵⁹, kerkent e respont ar raned⁶⁰.

Eun avel fresk a voud a-dreuz ar gwez-dero,
Trouz an दौरigou-red a deu din en hekleo.

Ar steredenn en Neñv a zo skeduz ha koant,
Al loar a skuill er ster he sklêrijenn arhant.

Ha va halon em hreiz a zo neuze ken gae,
Ma teu din c'hoant kana meuleudi da va Doue.

Rag en nozveziou sioul, pell diouz trouz ar hêriou,
An den a gav dezañ eo tostoh d'an Neñvou.

Na lakit biken en ho penn, Breiziz ker,
Dilezel ho ti sioul, ho mêziou 'zo ken kaer !

Ya, nozveziou kêriz 'zo nozveziou torr-penn,
E leh ho nozveziou 'zo gae, labourerien.

⁵⁹ D'an hini : « Da behini'' er skrid orin.

⁶⁰ kerkent e respont ar raned : bet reizet. Akordi a ra Pronost ar verb gand e rener.

O PALARAD

Sell mad, paotr an alar, rag an ero 'zo kamm,
Toull amañ, tort du-hont ; soh an alar a lamm.
Mousig, dalh tost Pichon, diwall da vond a-gleiz,
Rag Bouji da vlenier, a welan, 'zo direiz.

Jakez, paotr an alar, peleh ema da benn ?
Perag e tiskrogez pell diouz al letonenn ?
Ha te Mousig penn-skañv, perag out eet a-dreuz,
E leh beza bleniet eeun beteg ar hleuz ?

Ne ven ket sebezet e ve Yann e kounnar,
Rag gand al lodenn-benn, pa ziskrog an alar
Keid diouz al letonenn, e ranker hast afo,
Palad, a-raog ma vez ar hezeg en distro.

Krogit hep koll kalon, krogit stard, Fañch ha Per,
Ma chomit da dermal, demdost 'vefot re verr ;
Taolit a-leiz ar bal an douar a vruzunou,
Buan, 'vid ma ne vo ket al loen war ho seuliou.

N'eus nemed Alanig ha na ra ket e lod,
Nerzusoh e vefe ma karfe debri yod,
Ne dalv ket ar butun a zev dindan ar harz,
Pehed e ve d'e goan rei dezañ kig-ha-fars.

PICHON

Pichon, a lavare va zad,
A oa glaz⁶¹ en e yaouankiz ;
D'ar foar, kerkoulz ha d'ar marhad,
Pa 'z een gand sahadou gwiniz,
An oll a jome sebezet
En eur weled eul loen ken kaer ;
Ma n'em-bije ket her haret,
Pichon a ve bet gwerzet ker.
-Ma n'oa ket falvezet d'am zad
En em zizober euz Pichon,
Me 'gav en-doa greet eun dra vad,
Rag n'oa ket, e-giz loen limon,
Loen all ebed er Finister
Evid, eveltañ, dibrada
Heb mouzad, en eun taol kolier,
Eur harrad euz ar re vrasa.
Me n'em-eus ket anavezet
Pichon, p'oa c'hoaz glaz e vlevenn⁶² ;
Her gwelet em-eus atao treuet,
Koz-kenañ, ha gand eur bleo gwenn ;
Med ma ne veze sternet mui,
Da vihanna, beteg mervel,
En-deus bet atao da beuri,
Ivez atao leun e rastell.
Karet 'oa gand braz ha bihan.
Eüruz e ven c'hoaz hirio
Ma hallfen gweled anezañ
Koz-kenañ evelkent, ha beo.
-Med eur mintin, pebez anken,
Pebez glahar ha ranngalon,
Pa welis, e-harz e speurenn,
Maro-mik ar paour-kêz Pichon !

⁶¹ glaz : gand ster ar galleg.

⁶² e vlevenn : iskiz. "e vleo"

AR PESKETAER

War don : *Soñjit, peher, ez eo red deoh mervel.*

Eun heol skeduz d'ar mintin a lugern,
Ar pesketaer a bign oh beg ar wern,
Ha dreist ar vag, heñvel ouz diouaskell,
Al lien a zo digor-braz d'an avel.

Ar pesketaer a ya war ar mor don,
Leun a fiziañs ha laouen e galon,
Rag dreist e benn n'eus ket a goabrennou,
Dindan e dreid eo berr an houlennoù.

War an tevenn e bried, e vugale,
War o daoulin, evitañ a bed Doue,
Ha ne zistroint ket war o hiz d'ar gear⁶³,
E-pad ma vo chomet a-wel d'an douar.

Pesked, er vag, a zsikenn a-zoare ;
E-verr e vo bara d'ar vugale,
Chom a ray c'hoaz eun nebeud gwenneien
Ha sistr yahuz a vo leun ar werenn.

Siwaz ! du-hont, setu deuet eur goabrenn :
Al labous-mor a laosk eur griadenn ;
Eur barr-amzer a gouez euz an neñvou ;
Ar vag a zo dizroet gand an tarziou.

E-tal an aot e weler d'ar beure,
En-dro d'eur horv, ar pried, ar vugale ;
Med e-leh klemm ha nah an Aotrou Doue,
E houlennot baradoz d'an ene.

Kerkent ar mab, oajet a bemzeg vloaz,
A lavar krenn : « Daoust ha me n'on ket gwaz !
Evidom oll pa'z eo va zad maro,
War ar mor don bremañ me ya d'am zro ! »

⁶³ d'ar gear : Leoneg "d'ar gêr".

PAOTRED AR BEZIN-TONN

PAOTRED AR BIZIN TONN



Ar mor a lamm dreist ar rei er Ar c'hoabr zo leun a



luc' hed Ke zek er meaz, euz ho kreï-er



Ke-me-romp hor c'brog pao - tred

Ar mor a lamm dreist ar reier
Ar hoabr 'zo leun a luhed,
Kezeg, er-mêz euz ho kreier ,
Kemerom or hrog, paotred.

An noz a zo yen ha teñval,
Kazarh 'zo gand ar barrou,
Med an avel a hall yudal
Pa vez bezin a-vernious.

Ar bezin a zo da genta
Teil karet an Arvoriz,
Rag heb bezin n'ez eus netra,
Na patatez, na gwiniz.

Deom er mor beteg ar herhenn
Ha krogom oll, a-zoare,
Ma'z ay deg gwech war an tevenn
Ar harr, a-raog ar beure.

An trêz gand ar gorventennou
A stag ouz on divesker,
Ne garom ket dougen loerou,
Krohenn on-eus evel ler.

Dindan an dillad n'eo ket klouar,
Pa vez gleb, lost ar roched,
War ar bragez, o vond d'ar gear⁶⁴,
Me 'vez hanter-zehet.

Med perag ober arvezious ?
Daoust ha n'om ket tud kaled ?
N'om ket kizidig ouz ar riou,
An douar a vezo teilet.

⁶⁴ : Leoneg = d'ar gêr.

ARABAD EN EM FAZIA

Eüruz eo kêriz, gwenn o dorn, flamm o fenn !
Gwisket gand dillad du, ken kaer ha bourhizien,
Labourerien ar porz, labourerien ar gear⁶⁵
Pa'z eont eun tu bennag, da zul, a zo dispar,
Heñvel oh aotrounez ; rag hervez o doare
E lavarfeh o-deus eur hastell a-leve.
Mad, tostait eun nebeud, me 'gav din, e weloh
E kuz fall an dillad ar pezh a zo dindan,
Rag pa vez eul liou flamm aliez e vez kov moan,
Eur yehed reuzeudig a ra deoh soñjal
Ez eur a-raog an oad da weled ar bed all.
Ya, labourerien-douar, arabad eo kredi
E ve buhez paotred kêr gwell eged hoh hini,
Arabad barn an den diouh gweled e zillad,
Kement-se ne hall ket diskouez en-deus kovad ;
Dillad hir ha losteg a zo ar meur a gein,
Siwaz !ar hov n'eo ket diroufenn gand lein.

⁶⁵ ar gear : Loneg = ar gêr.

VA GWEZENN-DERO

E-barz el liorz, e-kichennig va lojenn
Gwelet hoh-eus eur wezenn gaer dero ?
En he disheol, va mamm ger, war he barlenn,
He-deus desket din komz e yez va bro ;
Kared a reen kleved a-dreuz he skourrou
Eun avel yah o voudal d'ar pardaez,
Hag o kana, kuzet e-touez he deliou,
E-pad an deiz, laboused a beb mouez.

Gwezenn-dero, da zisheol ah-eus ivez,
En o hozni, roet d'am mamm ha d'am zad,
Da beb eured e veze d'an dud-nevez,
Atao savet an daol e-harz da droad ;
Nag a bed neiz n'eh-eus-te ket bet kuzet,
En amzer gaer, ouz ar vugaligou !
Al laboused n'o-deus ket da zilezel,
Ha meulet out en o hanaouennou.

Goude beza treuzet ken aliez ar mor
'Oan kastizet, eun deiz, o redeg bro :
Kavet em-eus ar yehed e-tal va dor
Hag a-zindan va gwezenn gaer dero,
Ma tle koueza va gwedzenn, gand he hozni,
A-raog m'z in da gousked d'ar vered,
Er gwella koad me 'fell e ve greet enni
Peder blankenn 'vid ober eun arched.

AR HORRIGANED

Klevet hoh-eus d'an diskar-amzer,
E-kreiz an nozveziou teñval,
Pa lamm ar mor braz dreist ar reier,
Pa vez an avel o yudal,
Klevet hoh-eus, en traoñ d'ar menez,
Eur jabadao ken kounnaret,
Ma ro d'ar spered spont hag enkrez ?
Tehit diouz ar horrigned.

Dorn-oh-dorn a-dreuz ar bodennou,
En eur zañsal, en eur gana,
Ez eont da glask er gwenodennou,
Eun tremeniad evid laza ;
Diwall, diwall, paour-kêz tremeniad,
Rag ganto ma'z out dizoloet,
Evid reded ez eo diwezad.
Tehit diouz ar horriganed.

E aoulagad a deu da drelli,
Hebdale ne wel ket an hent,
Ne ra neuze nemed trei, distrei,
Ha gand ar spont e skrign e zent ;
Rag en eur helh ledan, ar vandenn,
En-dro dezañ a zo bodet,
Ema kabestret gand o jadenn,
Tehit diouz ar horriganed.

Ar horrigan braz a daol eur zell,
En eur hoarzin, war ar paour-keaz⁶⁶ ;
En e zorn eo digor eur gontell,
Gand gwad eun all ruz-tan eo c'hoaz
Hag e-kreiz trouz ar mor, ar gurun,
E krint oll : « ra vo lazet !
Rag keid amzer 'zo ma'z om ar yun ! »
Tehit diouz ar horriganed.

Gand eun taol kontell, en eur vodenn
Eo diskaret war e henou ;
Ker buan eo deuet en eun anduillenn
E galon hag e vouzellou ;
Ha d'ar mintin euz an tremeniad,

⁶⁶ ar paour-keaz : Leoneg : ar paour-kêz.

Hepken, setu zo bet kavet :
E dok ledan hag e voutou-koad.
Tehit diouz ar horriganed.

AN NEIZ

E-kreiz eur vodenn lann, pemp labous, en eun neiz,
Digor o daoulagad abaoe goulou-deiz,
A hed didrouz o mamm eet, kerkent ar beure,
Da glask eun nebeud boued evid he bugale.

Diskan

Bugaligou, na rit ket a vrezel
Biken d'al laboused.
Soñjit, p'edoh gwechall en ho kavell,
Gand ho mamm 'oah karet.

En eun taol er waremm e lamm bugaligou,
Bugaligou fallagr, dibouferien neziou ;
Al labousedigou keiz, a-boan ma'z int marbluñvet
Ma'z int en o bodenn, noz hag all, diframmet.

Setu boued leun he beg, sederig ha laouen,
Ar vamm o tond bremañ, du-hont, 'hed an draonienn ;
Ober 'ra troiou-kamm, evid en em guzed,
Ha galloud mond en neiz, heb beza bet gwelet.

Evid ar vammig kêz, siwaz ! pebez anken,
Pa wel ez eo laeret an neiz euz ar vodenn !
Hag abaoe, noz-deiz, a-uz d'ar bodennou,
Heb ehan ha truezuz e klever he hlemmou.

Mamm baour ne halli mui gweled da laboused,
Adaleg ar mintin emaint en eur gaoued ;
Kouik... da hervel a reont, en eur grena gand aon,
Rag o beg a zigor gand ar zehed, an naon.

Siwaz ! re yaouank int evid galloud beva,
Rag ne ouzont ket c'hoaz na debri, nag eva.
Bugale griz, warhoaz o gweloh o vervel,
A-raog m'o-devezo plu war o diouaskell.

AR VILTAÑSOU

Gwelet hoh-eus, 'hed an nozveziou,
Pa bar al loar hag ar stered,
Ar hornandoned er gwaremmou.
Kendirvi d'ar horriganed ?
Ne lazont ket an dremenidi,
Kared a reont avad farsal ;
Na zistroit ket diwevad d'ho ti,
Ma n'hoh-eus ket a hoant dañsal.

Klevit mad an dra vurzuduz-ma'
Arruet gand Jakez, eun nozvez ;
D'ar bourk ez eas da brena bara,
Eur foultrenn dorz a galz a bouez ;
Hogen, en eun davarn e chomas
Keid amzer dirag eur werenn,
Ma n'oa ket gwall abred pa zistroas,
Gand an dorz pounner war e benn.

Arruet e gwaremm ar honikled,
Pell diouz an tiez hag an hentchou,
E kouez e-touez ar hornandoned
Anvet ivez ar viltañsou ;
Kerkent en e zaouarn eur kroget,
Ha Jakez, e-kreiz ar vandenn,
A rank, sentuz, dañsal ha lammed,
Gand an dorz pounner war e benn.

Kement e lammas hag e tañsas,
'Hed an noz, gand ar viltañsou,
Ma teuas da ziskenn en e ziskoaz
E houzoug, e hroñch, e henou ;
Da houlou-deiz an amezeien
A gavas Jakez en e za,
Nemed, o burzud ! e-leh e benn
N'oa mui nemed an dorz vara.

Setu neuze, gwella ma hallent,
I, da zacha krenn war e vleo,
Gand fiziañs d'hen lakaad, evel kent,
Da vihanna ma'z oa c'hoaz beo ;
Euz e houzoug n'o-doa ket gallet
Diframma nemed an hanter,
Setu perag eo bet lesanvet

Er vro : *Jakez ar gouzoug berr !*

MARO AR HI

Eur mintinvez, da foar vraz Lezneven,
Ar paour-kêz Tom a dorras e jadenn.
Hogen e vestr, adaleg ar beure,
A yeas en hent, gand eul loen, d'ar foar-ze.
Dihun abred, ar hi Tom o gwelas
O vond er strêd, etrezeg an hent braz.
Teñval e benn, hag e lost war-ziskenn,
En eur c'hwesa, setu da Lezneven
Eñ da reded ; buan eh en em gavas,
Louz e vlevenn⁶⁷ gand poultrenn an hent braz.
Pell e klaskas a-dreuz, a-gleiz, a-zehou,
E zaoulagad beuzet gand daelou,
Pa deuas kerkent eur fallagr da grial :
« Harz ar hi klañv ! Bazad d'an aneval ! »
En eun taol kont, evel ar chas taget,
Haillevoded warnañ zo saillet.
Yudal a ra, rag ar bizier, ar vein,
A gouez skrijuz, a bep tu, war e gein.
Gallet en-deus evelato tehed ;
Er-mêz a gêr, leun-wad ha mahagnet,
Eh en em stlej, a-dreuz an tachennou,
Faoutet e benn, er-mêz e vouzellou,
Gand, war e lerh, en eun dachennad ed,
Ar paour-kêz Tom a deu d'en em astenn,
Kuzet da vad e-touez ar greun melen.
Eun nebeud c'hoaz ha mui ne vezo klañv.
Pep tra bremañ 'zo ruz en-dro dezañ :
Ruz-tan ar gwad dindan e vouzellou,
Ruz ar roz-ki, ruz ohpenn an Neñvou.
En-dro dezañ pep tra 'zo sioul ivez :
Al laboused ne ganont ken er gwez,
Hag en Neñvou, pa zao skeduz al loar,
E-pad ma kousk muntreien griz ar foar,
Ar paour-kêz Tom a zo kousket d'e dro,
E zaoulagad prennet gand ar maro !

⁶⁷ e vlevenn : e vleio.

AN DIWALLER LOENED

Ton : *Air du petit berger dans "Mireille"*.

E Breiz-Izel

Gwir douar ar varzed hag ar feiz,
Me 'zo ganet, hag e gwir vugel,
'Vid Breiz em-bezo, beteg mervel,

Kalon em hreiz

Hag eur wir garantez a-leiz ;
O tiwall va loened er strpejou

Hag er meneziou,

'On eüruz da gaoud eur vuhez didrouz

Evel buhez al labous ;

Euz ar menez beteg an draonienn,

An avel a gas va hanaouenn,

En or yez kaer,

E-pad ma red war va zelenn,

Prim-meurbed, va bizied tener.

A A ! A A ! A A !

Ouz an tommder

E-kreiz an hañv em-eus atao

An dour-red, fresk ha sklêr, euz ar ster ;

Evid disheol, a-uz ar reier,

Ar gwez-dero

Baradoz karet an hekleo :

Bez' em-eus, pa deu din c'hoant mori,

Eur gwele kinvi

War an hini m'en em ro da gousked

Oh kan al laboused ;

Ober a ran huñvreou kaer-meurbed :

Huñvreal a ran 'on euz va loened

Ivez ar Roue,

Ha n'em-eus er bed-mañ mestr ebed

Nemed va houstaiñs ha va Doue,

A A ! A A ! A A !

EUN TECH HUDUR

Malloz, malloz warnout, ya, malloz da viken,
Euz a-berz kement den en-deus ar feiz kristen,
Mezventi, mezeventi, mezventi villiget,
Binim gwasoh eged binim ar chas taget,
Poezon deuet, a-zaillad, euz a buñs an ivern,
A zev ar poull-kalon, a vrein mel an eskern !
Ar hrevusa vosenn, ar gwaso brezeliou,
A zo pell-braz da gaoud niver da walleuriou ;
Te 'laz gwaz ha maouez a-raog hanter an oad,
Hag ar pezh a zo skrijuz, da vinim, eet er gwad,
Eur eur rumm d'egile gwriennet er gwazied,
Euz ar vugale geiz a ra kornandoned.
N'eo ket hepken d'ar horv an tech hudur, siwaz !
A ra droug, euz ha spont, d'an ene gwasoh c'hoaz,
D'ar re a zo war ho tro, kerent ha mignoned,
Ar re⁶⁸ gand ho skwer fall en enkreiz 'zo bepred.
Nag a diegeziou kaer, n'eus ket pell c'hoaz brudet,
Gand tech ar vezverien a zo buan diskaret !
Nag a vugale fall, en eur en em vezvi,
A ra mez o herent en amzer o hozni !
Rag tan ar gwin-ardant, a-boan ma sao d'ar penn,
Ma c'hwez ar youlou louz e kov an den ohpenn,
Malloz, malloz warnout, ya, malloz da viken,
Mezventi, mezventi, mezventi villiget,
Binim gwasoh eged binim ar chas taget,
Poezon deuet, a-zaillad, euz a buñs an ivern,
A zev ar poull-kalon, a vrein mel an eskern !

⁶⁸ Ar re : "Pere" er skrid orin.

MARO FAÑCH

Atao, Fañch, en e yaouankiz,
A oa bet eun den a skwer vad,
Karet-kenañ gand e genvroiz,
Evel m'oa bet karet e dad.

Setu perag e timezas
D'eur bennherez yaouank ha koant,
Rag gwelloh eo dibaba gwaz
Gand furnez, eged gand arhant.

Ken eüruz e vije bet,
'Hed e vuhez, en e vereuri !
Med siwaz ! eur pardaez, touellet,
Eh en em daolas da hoari.

Da hoari gand Yann ar mezhvier,
Eun amezeg, brudet er vro
Evid beza brasa lonker
Euz ohpenn deg leo tro-war-dro.

O tond euz ar bourk, eun nozvez,
Yann a varvas gand e govad,
Med pleg ar mezhvier a zo diêz
Da lamed, eur wech eet er gwad.

E leh dond da veza furroh,
Goude maro Yann ar mezhvier,
Fañch a lonke bremañ gwasoh,
Muioh eged deg glabouser.

Ha stal Fañch a yee da stalig,
A-nebeud, feurm ar bennherez,
'Oe gantañ gwerzet oll, prestig,
'Vid kenderhel e lontregez.

E bried kêz hag e vugale
A vije bet er paourentez,
Pa falvezas eun deiz da Zoue
Ouz an dud keiz kemered truez.

Eun nozvez, Fañch, mezo-meurbed,
Hag ar hlaourenn leun e henou,
A oa, gand gadig ar vered,

Bet dianket e-touez ar beziou.

Pa deuas goulou-deiz, ar hloher
A gavas astennet, d'e dro,
Fañch, a-dreuz bez Yann ar mezhier,
Gand e govad ivez maro.

O Bretoned ! va migoned,
Tehit krenn diouz ar vezverien ;
Ae vezventi, siwaz ! er bed,
A gas kement tra da dorgenn.

It d'ar gêr goude gousperou,
Hag evit hepken sistr yahuz ;
Ho pried hag ho pugaligou
Evidoh 'vo trugarezuz.

MIN-DU

Adaleg ar mintin, da foar vraz Lezneven,
Al leue bihan a zo dispartiet diouz e vamm,
Hag abaoe, Min-du, teñval-meurbed he fenn,
Ne ra nemed blejal ha ne beur ket eun tamm.

Paotr ar zaout, nehet-braz, ne hall ket he diarbenn,
Rag en despet dezañ, dreist kement kleuz e lamm :
O klask he leue bihan er menez, en draonienn,
E red, 'vel pennfollet, a-heul ar strêjou kamm.

Mann ! mann ! mann ! a respont truezuz-oll an hekleo,
War ribl ar prajou glaz, e-kreiz ar hoad dero
Euz al leh ma teu al laboused, spontet.

Mann ! mann ! mann ! a glever c'hoaz, 'hed an noz, er hraou ;
Ha beteg ar beure, Min-du, gand he hlemmou,
Ne elz ket, eur mare, tud an ti da gousked.

D'AR VUGALE

Bugel, da zaoulagad a hall chom digor-braz
Evid selled ouz an Neñvou ;
Da dal 'zo ken dinamm ! a-zindan ar hoabr glaz,
Ken lugernuz eo da zellou !

Ar peher, evel dout, ne gred ket digeri
Braz e zaoulagad, gand frankiz ;
En ober e Grouer e oar ne hall ket mui
Lenn, evel en e yaouankiz.

Bugel, 'vel eun Êlig, gand da vouez dudiuz,
Kan eur werz da Grouer ar bed,
Rag en da galon flamm n'eus netra stlabezuz,
Evel an erh eo gwenn bpred.

Mouez an den fall avad a douas ken aliez,
Ma rank tevel hiviziken :
Ar vouez-se ne dle ket kana gand an Êlez ;
Yudal a ra gand an enkreuz.

Bugel, lak da fiziañs, e daouarn an Êl mad,
Da bedennou, mintin ha noz,
Rag pedenn Êl an douar, gand or Mamm hag on Tad,
'Zo selaouet er Baradoz.

Kement Judaz avad, pa deu deiz ar hastiz,
Kaer en-deus pedi gand glahar,
Ne vez ket selaouet ; oh peden an den treiz
E vez greet atao skouarn vouzar.

Bugel, te hall mervel, heb krena gand enkreuz,
Rag ar baradoz 'zo da vro,
Ha beteg kador Doue, da vreudeur an Êlez,
Oll en eur gana, da zavo.

Siwaz ! an den difeiz, hag a nah e Grouer,
N'en-deus da hedall, d'e vrao,
Nemed an nehamant, an ivern en eur ger,
E-kreiz an oll boaniou garo.

Bugel dinamm ha gae, gwelloh eta mervel,
Ma teuez eun devez da ziroll :
Er Baradoz, dioustu, kentoh ober eun Êl

Eged beva 'vid mond da goll.

EN EUR LUSKELLA

Meur a wech ma'z eus dienez
En or stal
Eh-eus, en distro, karantez
Da vamm vad ;
Med n'eh-eus ket, va bugelig
Ken karet,
Gwele 'vel ar re binvidig
Da gousked,
Da gavellig n'eo ket yen
Ha kempenn eo greet ganen.
Gra da gousk, sioulig evel eun Êl,
Rag atao,
Da vamm vad, e-kichenn da gavell,
A jomo.

Ma ne welez en eun huñvre
Paleziou,
E welez digor marteze
An Neñvou,
A-zindan an heol ken skeduz
Greun melen,
Er hrinennou bokejou ruz,
Glaz ha gwenn,
Ha laboused a beb liou
O nijal dreist ar mêziou.
Gra da gousk, sioulig evel eun Êl,
Rag atao,
Da vamm vad, e-kichenn da gavell,
A jomo.

Da zillad prenet gand va foan
A zo paour,
N'em-eus ket evid da zae hloan
Spillenn aour,
Ha pa zihunez, va bugel,
Ne hallan
Diskouez dit nemed eur hoariell :
Ar groaz stean⁶⁹
Euz va japeled, bemdez
Chapeledet d'ar Werhez.
Gra da gousk, sioulig evel eun Êl

⁶⁹ stean : "stên" (Leoneg).

Rag atao,
Da vamm-vad, e-kichenn da gavell
A jomo.

PAOLIG

Tri bloaz en-deus Paolig, abaoe miz Genver,
Oh an daol eh azez bremañ, koulz hag eur gwaz.
Med evid tizoud ar pod, e vreh a zo re verr,
E vamm a vesk eta yod en e skudellad leaz⁷⁰.

N'eo ket figuz nemeur ar Paolig, mab da Ber,
Leun al loa veuz⁷¹ ar yod, euz ar skudell er-meaz⁷²,
A zo stlapet gantañ, a-dreuz hag a-benn herr ;
Med en e gornaillenn ne rinkl ket oll, siwaz !

Hag ar pezh ne ya ket, avad, en e henou,
'Zo stag ouz e zivoh hag ouz e vuzellou.
War e vruched ivez e kouez eul lodenn vraz.

Koulskoude, den en ti n'hen gourdrouzo biken
D'hen gweled gand ar yod hag al lêz digempenn,
Hag ar hlanded a verv en e zaoulagad glaz !

⁷⁰ leaz : "lêz" e leoneg.

⁷¹ al loa veuz : ? al loa, meuz ar yod enni (?)

⁷² er-meaz : "er-mêz" (leoneg).

KLEMMOU AR HLANVOUR YAOUANK

Laboused koant ar hoad, ehanit da gana,
Bezit truez ouz anken hag ouz glahar ho mignon,
Kuzit ho levenez, hirio da vihanna,
Va lezit da vervel, hep kreski va ranngalon.

Rag ne din ket hiviziken,
Gand levenez, e-skeud an deliou,
Da hourvez e-harz eur wezenn
Evid kleved ho kanaouenn.

Gwez a garen gweled glaz, d'an nevez-amzer,
Dindan avel an hañv a-boa ma teueh da fiñval ;
Evid diskouez warhoaz ho kañv d'ho mignon ker,
Lezit eun avel greñv en ho skourrou da voudal.

Rag hiviziken ne din ket
E-harz ho troad, dindan ho teliou,
D'en em astenn evid kleved,
A-dreuz deoh, pep seurt hirvoudou.

Sterig arhant ar prad, sklêr 'vel eur melezeur,
Gweled a reen va skeud ennout oh en em dresa ;
Dindan eur goabrenn zu ra vo teñval da zour
Warhoaz, pa lavarin adie da vuhez ar bed-ma'.

Hiviziken, er yeot livriz,
N'em gweli ket ennout o solded,
D'ar paradez-noz pa gouez ar gliz,
Pa'z out gand al loar sklêrijennet.

Mor, en deveziou kaer ez een em bagig skañv,
Gand he lien digor-braz, du-hont, pell, da besketa ;
Pa vezin tremenet, gra 'vel e-kreiz ar goañv,
A-zindan da darziou, d'an oll reier braz-kena'.

Rag heb dale, va bagig kêz
War an aot a vezo dilezet,
Kazi goloet oll gand an trêz
Hag he lien gwenn, eveldon, breinet.

JEZUZ HAG AR VUGALE

En devez-se, Jezuz, skuiz gand e brezegenn,
A reas eun ehanig e-harz troad eur wezenn ;
Ar bobl 'oa niveruz, mesket en-dro dezañ,
Ar publikan a oa demdost d'ar farizian.

Ar helh, heb dale pell, a oa deuet kalz strisoh,
Rag an oll a glaske gweled Jezuz tostoh ;
A-boan ma halle Per, e penn an deskibien,
Dalher eun dachennig frank en-dro d'ar wezenn.

Priñsed ar veleien a lavare da Ber :
« Ni 'fell eun nebeudig diviz gand ho mestr ker,
Evid gouzoud hag-eñ zo profed war an douar. »
Hogen, ouz o fedenn, Per a ree skouarn vouzar.

Klask stourm outañ pelloh, ne dalve ket ar boan ;
Penneg 'vel eur Breizad, ha kazi droug ennañ,
Per a jomas ken mud ouz ar farizianed,
Mud atao, mud ivez ouz ar publikaned.

Hogen, setu merhed, ganto peb a vugel :
« Lezit or bugale da bokad d'e vantell. »
Ha kerkent 'oe klevet eur vouez karantezuz,
Skiltroh eged an êr ; hounnez 'oa mouez Jezuz.

« Simon Per, emezañ, bezit madelezuz,
Lezit ar vugale da zond beteg Jezuz,
Rag den, e gwirionez, ne yelo d'an Neñvou,
Ma n'eo ket ken dinamm hag ar vugaligou. »

JEZUZ HAG AR PINVIDIG

Ar brud euz a Jezuz a oa skignet a-bell ;
Hogen, eun den youank, pinvidig-braz meurbed,
A deuas da houlenn mond e reñk an Ebestel.
« O Mestr ! hoh heul a rin e peb leh, ha bepred. »

Jezuz, goude m'en-doa taolet warnañ eur zell,
A respontas dezañ : « Kimiadit diouz ar bed,
Roit d'ar paour ho tanvez, roit beteg ho mantell,
Goude-ze m'em-bezo mall d'ho tegemered. »

An den yaouank a yeas war-eeun d'e vro,
Med evid heul Jezuz ne deuas ket en distro,
Rag e galon a oa re stag ouz e zanvez.

« Êsoh eo d'eur hañval mond dre doull eun nadoz
Eged d'eur pinvidig gounid ar Baradoz. »
A lavaras Jezuz. Doujañs d'ar baourentez.

AN DEN

Bihan 'vel eur hwibuenn a-zindan ar hoabr glaz,
En draonienn, er menez, pe c'hoaz war ar mor braz,
An den, petra 'hallfe talvezoud war an douar ?
Daoust hag ar zoñjezon a nij euz e spered
Ne hallfe ket pignad dreist an heol, ar stered,
Beteg eur sklêrijenn ha n'he-deus ket he far ?

Euz a vil bloaz da vil bloaz pa weler ar reier
O chom heb uza tamm a-zindan an amzer,
Perag e vreïn an den evel eun amprevan ?
Ha perag beza roet dezañ kalon ha penn ?
Perag e vuhez 'zo berr evel eul luhedenn
A red er houmoul du d'an deveziou taran ?

Perag ? Abalamour n'eo ket greet 'vid an douar,
Ganet eo 'vid gounid eun deiz ar vro dispar
O-doa kollet on tad hag or mamm dizentuz.
Bepred an den a dle sevel uheloh e benn,
Bez' en-deus eun Ene, bez' eo dioh eur ouenn
Ha ne hall ket mervel : gouenn an Dour gallouduz.

AR HOLONEL EUZ VILLEBOIS-MAREUIL

War don *gwerz Kêr-Iz*

Du-hont, en Afrik ar hreisteiz,
E veve didrouz, e frankiz,
Eur bobl nerzuz hag a galon,
Warni pa gouezas ar Zaozon.

Gand eun nerz vraz, unan oh deg,
Heb ehan, ar bobl kaloneg
Ouz ar Zaozon a gred herzel ;
Frankiz ! emezi, pe vervel !

En eur weled kemend a nerz,
Kemend a lealded er Boers⁷³,
D'an Trañsvaal e ya Frañsizien,
Villebois-Mareuil en o fenn.

Villebois 'zo pinvidig-braz,
Tad d'eur plahig a bemzeg vloaz ;
Eüruz e halle beza
En e vloaveziou diweza.

Med Villebois-Mareuil n'eo ket
Eun den hag a hall chom kousket,
E-pad ma laz forbaned,
Bugale kement ha merhed.

Kenavo, merh ! Kenavo, Frañs !
Hag eñ en hent, leun a fiziañs
En e ouiziegez, en e nerz,
Evid divenn gwir ar Boers.

Noz-deiz, e penn e zoudarded,
E koueze war ar forbaned :
Nag a bed kant, e Colenso,
En-deus terhounet⁷⁴ anezo !

Siwaz ! war dachenn an emgann
Ezeo skoet, gand eun tamm forban ;
Med da wad, en Afrik skuillet,
O Villebois ! n'eo ket kollet.

⁷³ Boers : Skriva a ra "Boers" gand eun "s", liester ar galleg, evid rima.

⁷⁴ terhounet : ?

Da wad, soudard nerzuz euz Frañs,
Da viken a grio VENJANS !
Rag, en despet d'ar Zoazon griz,
Bebet ar *gwir* hag ar *frankiz* !

BAZAD D'AR ZAOZON

Eur gounnar vraz a verve e kov an aneval ;
Bezom war on evez, Breiz-Izel ha Bro-Hall,
Rag Bro-Zaoz, a-nevez⁷⁵, a ziskouez he dent lemm,
Ar c'hoant braz d'on lonka 'zo skrivet war he dremm.

Chomom atao dihun, Bretoned, noz ha deiz
Rag, evel a ouzom, ar Zaozon a zo treiz,
Ma n'on-eus ket bepred on daoulagad digor,
O listri buan a vo demdost d'or porziou-mor.

Ma ne vezom ket treh, an istor hen diskouez,
N'eus netra da hedal, diouz ar Zaozon didruez,
Nemed eur maro kriz, goude kalz a boaniou,
Er prizoniou teñval o-deus war o bagou.

En da za ! pesketaer, ha te, labourer-douar,
Ha bazad d'ar Zaozon, war vor evel war zouar ;
Bouhal ar martolod a dle faouta pennou,
Ha falh al labourer diframma bouzellou.

Pesketaerien Arvor n'int ket kornandoned,
'Vel Cornic ha Surcouf int gwir vartoloded ;
Tud ar menez o-deus, gand kalon Duguesclin,
Penn an tregont Breizad euz emgann Josselin.

⁷⁵ Bro-Zaoz, a-nevez : Fachoda.

AR ZAOZON DIGALON

Eiz devez, noz ha deiz, gand e bevar mil leon,
Al leon KRONJ⁷⁶ a zalh penn d'hanter-kant mil a *Zoazon*
En despet d'o niver, ha da gazl kanoniou
Pignet gand ar re-mañ e lein ar meneziou,
E-pad ma chome c'hoaz gand ar *Boers* eun tenn
Ar *Zaozon* a goueze niveruz 'vel kelien.
Med siwaz ! petra 'dalv kemend a nerz-kalon,
Pa vez en hoh eneb an niver hag an naon ?
Hag ar pezh 'zo gwasoh, ar boan skrijuz, garo,
Da gaoud an alan, brein, gand c'hwez ar re varo !
Rag ar *Boers* ivez a goueze puill brema',
Evid en em zivenn pa n'o-doa mui netra.
Merhed ha bugale, beuzet oll en o gwad,
A goueze maro-mik, kement ha pried ha tad.
KRONJ, evid o bezia, da houlenn 'ta neuze,
Digand ROBERTS⁷⁷ ar *Zaoz*, eun nebeudig mare.
Eñ, gwechall, pa oa treh, den leal hag a galon,
En-doa lezet ober keemnt-se d'ar *Zoazon*.
Bretoned, selaouit ar pezh a respontas,
D'ar jeneral leal KRONJ, ROBERTS ar muntrer braz :
« Evid bezia da dud, na dalv ket dit ar boan
Goulenn, eun eur⁷⁸ hepken, da devel an emgann !!! »
Ouz ar *Zaozon* ken kriz, ha leun a warizi,
Piou 'ta n'en-defe ket, leiz kalon, kasoni ?

⁷⁶ KRONJ : ? Eur Boer (?)

⁷⁷ ROBERTS : Marechal e penn ar *Zaozon*.

⁷⁸ eur : eurvez.

EN EUR VOND D'AN TONKIN

On lestr a rog ar mor ; an douar 'zo pell, da vad ;
Eur hogn euz ar Provañs, e liou ruz ar pardaez,
A jom c'hoaz eun nebeud dirag on daoulagad
Leun a zaelou tener, leun a dristidigez.

Teñval, ha ken pounner hag or halonad,
Eur pennadig goude, warnom an noz a gouez !
« Kenavo ! bro gaer Frañs ! mamm ar gwir hag ar mad ! »
A ganom oll kerkent, en eur zevel or mouez.

Kenavo !... ger tener, hag ivez kaer-meurbed,
En nozvez-se dreist-oll, e genou soudarded ;
Koulskoude ni gouskas, heb soñjal er maro.

Daou vloaz 'zo tremenet ; med nag a bed, o Frañs !
Euz ar re 'gane dit "kenavo", gand fiziañs,
'Zo marvet evidout, hep klemm, pell diouz o bro !

GOUDE AN EMGANN

Hanter-varo kazi gand an naon, ar skuizder
En eul leh dibabet, d'an noz, p'en em gaver,
 Louz oll gand ar vouillenn,
War eur holo flêriuz astennet war ar pri,
A-raog en em daoler eur mare da vori,
 Me 'lavar eur bedenn.

An hini 'lavaren gwechall, noz ha mintin,
P'oan c'hoaz eur bugelig, war bennou va daoulin
 Ha va daouarn e kroaz,
Ar bedenn desket din gand va mamm er havell
Hag a deue da gerhed eun eur halir, eun Êl,
 Gand eul levenez vraz.

Me 'bed Mestr an Êlez ha Mestr ar zoudarded
Da gemered en Neñv eneou va mignoned
 Maro war an dachenn,
Rag pa'z eo gwir, siwaz ! ne hallint er bed-ma'
Beza didamallet, Doue, ro da vihanna
 Dezo da gurunenn.

Goude, me zoñj er gêr, er hogn goullo, siwaz !
Oh an hini⁷⁹ va mamm a zell gand glahar vraz,
 O ouela d'he bugel,
Hag em housk e kav din gweled va mignonez
O tond beteg ennon, gwisket 'vel ar Werhez,
 Gand diouaskell eun êl.

⁷⁹ an hini : "pehini" er skrid orin.

MARVET WAR DACHENN AN EMGANN

Mignon, te an hini⁸⁰ 'zo bet test euz va foan,
Pa gouezis mahagnet war dachenn an emgann,
Hag evel eur gwir vreur eh-eus va dastumet,
Heb aon ebed, d'az tro, da veza diskaret,
A-raog mervel, mignon, me da drugareka
Ha da bed da zelaou va homzou diweza :
- Eüruz te hallo, war douar Frañs diskennet,
Da vihanna mervel el leh ma'z out ganet ;
Kerkent ha ma laki war douar or bro da droad,
Lavar d'an hekleioiu, da gement tremeniad,
On e-kreiz an emgann, e gwir zoudard, maro,
En eur zelher bepred ar zoñj c'hwek euz va bro.
Ma teufes da dremen eun deiz dre va farrez,
Etrezeg va zi-soul e karfen e yafes ;
Pell da veza maner, bihan eo va lojenn,
Med koantig eo kenañ, gand he mogerioù gwenn,
E disheol gwez dero leun a ganaouennou,
E-harz troad ar menez ha war ribl ar prajou.
Kee pelloh, e jardrin kelhet gand eur harz beuz ;
Tro-war-dro d'eur feunteun a zour yahuz, ez eus
Eul letonenn hlaz-kaol, dindan gwez-avalou ;
Diou vaouez a weli beuzet en o daelou ;
An diou vaouez-se n'o-deus nemed eur zoñjezon,
Nemed eur garantez e goueled o halon :
Unan a hed he mab, oll fiziañs he hozni,
Hag eben ar mignon 'dlee beva ganti.
O va mamm ken tener ! O va gwir vignonez !
Er Baradoz hepken ho kwelin eun devez.
Med te, va mignon ker, ma yafes euz va ferz
Evid rei d'o halon eun nebeudig a nerz,
Lavar em-eus em feiz dalhet atao fiziañs,
Hag on marvet, en eur grial : « Bevet ar Frañs ! »

⁸⁰ an hini ; "pehini" er skrid orin.

EN DISTRO EUZ AN TONKIN

Ne jom mui seurt ebed euz va zi-soul *Pontlez*,
Nag eur pennad moger, nag eur mên en e bez,
An douar am-eus flastret em yaouankiz, diarhen,
An oaled, leur an ti, 'zo bremañ letonenn.
Atao me zalho soñj euz an devez m'oan bet,
O tond euz an *Tonkin*, d'am bro *Treflez* distroet ;
A-boan arruet e *Brest*, heb chom da varhata,
Setu-me, war va zroad - rag em yalh n'oa netra -
Da gemered an hent a gas war-zu va bro,
Heb soñjal lavared da *Vrest* kenavezo.
Kleved 'reen en hekleo kanaouenn ar goukou' ;
O ! ne me 'rede skañv, en eur dreuzi *Gouenou*,
Plabenneg, *Lezneven*, heb aon d'en em skuiza,
Rag du-hont, em zi-soul, e soñjen ehana.
C'hoaz eur pennadig hent, hag e welfen ar mor,
Euz mêziou *Plouider*, ha dor va zi digor,
E-kichenn ar menez, e ribl ster goant ar *Zeaz*
A ruill he dour arhant a-dreuz ar prajou glaz.
Evel eur pesketaer, tizet war ar mor don
Gand eur gwall barr-amzer, hag a drid e galon
Pa wel, en eun taol-kont, an avel o koueza,
Hag ar porz-mor el leh ma hallo c'hoaz douara,
Evel-se, me, kerkent eet war-laez ar mêziou,
En a-raog ha dillo da daoler va zellou
War menez an *Toupet*, a wez-pin goloet oll,
Dindan ar re⁸¹ gwechall e c'hoarienn en diheol,
War haleg ster ar *Zeaz*, tro-war-dro da *Bontlez*,
War di-soul an draonienn, e-harz troad ar menez...
Swiaz ! an huñvre kaer, swiaz ! al levenez,
A nijas a-zindan alan griz an enkreiz,
Rag eun avel diroll a oa bet tremenet
El leh-se, kaer a-raog, ha bremañ dismantret.
Na kriadenn, na kan, en êr, dreist ar mêziou,
Al laboused a oa tehet a vandenou,
Rag dindan ar vouhal ar gwez 'oa diskaret
Hag a-douez ar skourrou kement neziz diframmet ;
O veza ma ne oa mui gwez evid rei diheol,
Leton glaz ar menez 'oa bremañ goeñvet-oll ;
Ar ster, en hini⁸², yaouankig, e welen
Skeud ar raoz, an haleg hag ar gwiniz melen,
Skeud kement a loened, ar re⁸³, diouz ar paradaez,


⁸¹ ar re : "pere" er skrid orin.

⁸² en hini : "e pehini" er skrid orin.

En eur vlejal, a deue da zoura da *Bontlez*,
Ar ster, ken kaer gwechall, gand skeud kemend a draou,
'Oa dizolo, siwaz ! a-zindan an Neñvou,
Hag er yeot, diwanet el leh m'oa leur va zi,
Eun amprevan, en heol, a welis o vori !...
Kollet ganen fizsiañs, ha va halon rannet,
Setu-me da bignad war menez an *Toupet*
Euz al leh ma weler a-bell ar mêziou braz ;
Azetet war eur roh, ahano me 'daolas,
Mantret, war an draonienn, eur zell hir ha truezuz,
Ha va zal en daou zorn, neuze me 'leñvas druz !

D'AM HOAR HENA, LEANEZ

D'AM C'HOAR HENA, LEANEZ



Sonj ec'h euz va c'hoar ger euz 'Tre-flez Euz hon lo-jén-



nik a Bount lez El leac'h m'hon euz gand hon tud ka ret,



Hor iaou an kiz gaer tre me net El leac'h m'hon euz gand



hon tud ka ret Hor iaou an kiz gaer tre me net.

Soñj eh-eus, va hoar ger, euz Treflez ?
Euz on lojennig a Bontlez
El leh m'on-eus, gand on tud karet,
Or yaouankiz kaer tremenet.

Eiz bugel ez oam d'ar mare-ze,
Heb gouiziegez, seder ha gae ;
Aliez bremañ, pa zoñjan em bro,
E teuan da skuill daelou c'hwero.

Rag an amzer diouzm 'zo pell,
Ha ni, digor an diouaskell,
A-gleiz, a-zehou, siwaz ! 'zo nijet,
Heb mui galloud en em weled.

Rag du-hont p'on bet o pardona,
N'em-eus anavezet netra ;
Or mêziou ken glaz, ken dudiuz,
Hirio 'zo melen ha truezuz.

Gwez ar menez oll 'zo diskaret
Hag e leton a zo goeñvet ;
Euz on ti ne jom ket eur voger,
Ha trohet eo haleg ar ster.

Evel en eun huñvre, koulskoude,
Em-eus ho kwelet adarre,
E ribl ar ster, e yeot ar prajou,
O reded evel einigou.

Ha diouz an noz, en-dro d'an oaled,
Dirag eun tan-balan bodet,
Ho klevis, a vouez uhel, o kana
Eur werz kaer da Zantez Anna.

Siwaz ! an hunnvre n'eo ket padet,
Ha va halon 'zo bet rannet
O lavared, gand tristidigez,
Kenavo da vèziou Pontlez.

Va hoar ger, plijadur ar bed-ma',
Evel a welan, n'eo netra,
Setu perag sehom on daelou ;

En em weled 'raim en Neñvou.

EN EUR VOND D'AR PARDON

Nemed, e skeud ar hleuz, eur roudenn a zisheol,
Heoliet kaer-meurbed 'oa, mintin mad, an hent oll ;
An dud, a-strolladou, re vraz ha bugale,
Dibreder, 'hed an hent, 'vel an heol a oa gae ;
Eur zulvez 'oa, mar plij ! deiz eur pardon ohpenn ;
Ar merhed, gwisket kaer, a zivize laouen,
Ar gwazed, ken kaer all, puret gwenn o botou,
A gleved o farsal hag o kana soniou.
Hag a bep tud d'an hent al laboused ivez,
Evel evid heul o han, a zave skiltr o mouez.
Kleved a reed ohpenn ar chas stag, oh harzal,
An anevaled korn, en draonienn, o vlejal,
Hirvoud an avelig e lein ar menezioù
Ha klemmadenn an dour a-dreuz mein ar gouerioù.
Kanaouenn, hirvoud, trouz, a-dost koulz a-bell,
En êr a zave skañv war askell an avel.
Kemend a levenez, a reas, evel gwechall,
D'am halon enkrezet, en eur mare, tridal.
Evel da hwezeg vloaz, setu-me da gana
Ha da farsal kement hag ar re haea ;
Ne zoñjen ket en-doa dorn an amzer, siwaz !
War va zal roufenneg skrivet an oad, don-braz,
En eur zelled ouzin, ar re yaouank, moarvad,
A deue da vousec'hoarzin ha da va goapaad,
O lavared izel : « Sellit, ar hêzig koz
Ne zoñj ket eo ken tost, euz e vuhez verr, an noz ! »
Petra 'ra ze, peogwir em-oa c'hoaz, eun devez,
En eur vond d'ar pardon, tañvet al levenez,
Hag an amzer didruez, siwaz ! a vale buan,
Hag ar gozni n'eo ket pell diouz ar re vihan.
Nemed, e skeud ar hleuz, eur roudenn a zisheol,
An hent a vezo c'hoaz, da bep hañv, heoliet oll,
Ha pa vezin maro, dreizañ e vo gwelet,
O vond gae d'ar pardon, koz ha yaouank bepred.

AR GOZNI

A baziou prim hag hir, kement bloaz a dremen,
Amzer griz ar gozni 'zo demdost din siwaz !
Em bleo, gwechall ken du, meur a vlevenn 'zo gwenn,
Beh ar bloaveziou 'zo pounner 'vid va diskoaz.

Dizale me 'ranko kimiada, gand anken,
Diouz ar hoajou dero, diouz an traoniennou glaz,
Va daoulagad prenned ne hallint gweled ken
Ar mor o lammed uhel dreist reier an aot vraz.

M'em-eus kemend a geuz o tilezel an douar,
Ma'z eo va halon baour rannet gand ar glahar,
O soñjal eo ken tost ar mare da vervel,

N'eo ket m'am-befe mall da weled va Hrouer :
Aon em-eus na ve ket ar Baradoz ken kaer
Ha va bro Treflez, perlezenn Vreiz-Izel.

CREDO AL LABOURER-DOUAR

Tennet euz ar galleg : *war eun ton galleg.*

Al loar, an heol hag ar stered en Neñvou,
Ar mor ken don, an draonienn, ar menez,
Ar yeot er prad, er hrinenn ar bokejou,
O Doue krouer ! oll a zo greet ganez ;
Labourer-douar, dirag eun ober ken braz,
War-dro kuz-heol pa zon an Ajelus,
Va mouez dister a bign euz an dachenn hlaz,
Beteg ennout, o Doue ken gallouduz !

Diskan

Me 'gred ennout, Mestr, rag gand eur hwevadenn,
En eun taol, e peb leh, da bep tra te 'ro buhez ;
Doue gallouduz, en-deus bet krouet an den,
Me 'gred en da vraster hag en da vadelez.

En eun ero, digoret gand an alar,
Va dorn ledan a daol an had a-leiz,
Evel yeot druz buan e tiwanont en douar,
Ha war bep had e sao pennou gwiniz ;
Diwezatoh ma teu, gand eur barr-amzer,
An dachennad oll da veza stoket,
E-leh sevel va fenn 'eneb d'am Hrouer,
Evid pedi, kentoh, ez eo soublet.

An douar a ro, goude va labour pounner,
Magadurez d'am fried, d'am bugale,
Ne rofen ket evid ar paleziou kaer,
Va lojennig ha va mêziou ken gae !
Rag oll, da zul, en-dro d'an daol dastumet,
Etre va fried, va merh ha va mibien,
Em-eus fiziañs da veva pell d'o hared,
Ha va halon em hreiz a zo laouen.

Eun devez c'hoaz, evel gwechall ma teufe
Enebourien da goueza war or bro,
Kerkent, du-hont, gand va mibien me yafe
E-kreiz an tan, evid herzel outo ;
Evid divenn va bro garet, er brezel,
Me 'garfe rei, ma vije red, va buhez,
Hag a vouez uhel e kanfen, en eur vervel,
Eur wech all c'hoaz, a-raog diskenn er bez :

Diskan

Me 'gred ennout, Mestr, rag gand eur hwevadenn,
En eun taol, e peb leh, da bep tra te 'ro buhez ;
Doue gallouduz, en-deus bet krouet an den,
Me 'gred en da vraster hag en da vadelez.

KOLACH LEZNEVEN

D'an Aotrou Roull, rener kolach Lezneven.

Or holach⁸⁴, er huz-heol, a skoe war ar mêziou,
Ha diouz an hanternoz, ohpenn, 'oa mogerious
Ken uhel, ma ne halle lagad ebed, gweled
Kêr Lezneven, na skouarn, trouz ar ruiou kleved.
An nor, atao prennet, a oa war eur ru striz,
Den o tremen enni, nag en noz nag en deiz,
Da zeiz ar foar hepken, da lun, tadou, mammou,
A lezed eun nebeud da vond dreist an treuzou,
Hag en eur zal, a-gleiz, eh hedent ar mare
Da halloud eur pennad gweled o bugale.
Er holach 'oa daou borz : war unan e weled,
E tri reñk, ar saliou 'vid ar skol, ar housked,
Hag en eur hogn, a-zehou, dereziou da bignad
D'eur chapelig el leh, kent eged labourad,
E taoulinem bemdez, mistri-skol, bugale ;
Eno, pedennou c'hwek a zave war-zu Doue.
Dre zor vraz an ti-kreiz e kouezed er porz all ;
O ! na me 'blijje din ar porz braz-se, gwechall !
Ar porz-se 'oa karet, a gav din, gand an oll,
Rag e wez uhel, en hañv, a roe deom disheol.
Eur voger, eru hael houran, goloet oll a zeliou,
A oa d'an traoñ d'ar porz ; goude-ze jardrinou,
Gand a bep seurt gwez-frouez er re⁸⁵ laboused,
Euz ar beure d'an noz, a gane kaer-meurbed,
Heb, dirag or mistri, na sponta, na nijal,
Pa'z eent er vali hlaz, sioul, da lenn o brevial.

Eun deiz, o kimiada diouz va holach karet,
E lezis war va lerh mistri vad, mignoned
Ar re⁸⁶ 'ouelan, siwaz !
Taolet ha distaolet er bed 'vel eun divroad,
Euz mignoned ken ker e ouzon, diwezad,
Em-eus dienez vraz !

Siwaz ! neuze me 'oa ken yaouank, ken dibenn,
Ma n'am-oa ket gwelet, e-touez mel va gwerenn,
Ivez eur vestl c'hwero ;
Aliez ar homzou flour a guz kalz a hevier ;

⁸⁴ or holach : or skolach.

⁸⁵ er re : " e pere " er skrid orin.

⁸⁶ Ar re : " Pere 'ouelan " er skrid orin.

A-zindan eur mor sioul ar paour-kêz pesketaer
A hall kaoud ar maro.

Evel-se, va spered faziet gand kalz huñvreou,
Pa'z is diouz Lezneven evdi reded broiou
Hag evid klask ar brud,
Ne zaleejen ket pell d'anaoud em-oa kollet
Al levez, ar peoh hag em-oa selaouet
Euz ar bed ar vouez yud.

Evel-se, ker koantig a-zindan an Neñvou,
Eur ster a ruill he dour a-dreuz yeot ar prajou,
Skeduz evel an heol,
Beteg ma'h en em gav war an aot da reded
El leh e-touez an trêz, eo kerkent killaret,
El leh ma'z in da goll.

Meur a vloavez 'zo tremenet abaoe,
Med bemdez e soñjan, a vare da vare,
E kolach Lezneven ;
Hag evel pa welfen dirag va daoulagad
An amzer dremenet ha va mignoned vad,
E lavaran laouen :

O ! distroit a-nevez, va bloaveziou ken kaer,
Kalz re gaer marteze, 'vid beza bet ken berr,
O ! me 'fell din : nijal dreist menez ha traonienn,
Evid da weled c'hoaz, o kolach Lezneven !
Kleved va mistri-skol o komz euz *Rom, Aten,*
O tiviz e diou yez *Siceroñ, Demosthen.*

Me 'lavar... med kerkent e klevan en hekleo
Eur vouez o hoapaad, o respont : « kenavo,
Kenavo da viken !
Ar pezh ah-eus kollet, 'zo kollet evid mad,
Ha ne dle chom ganez mui nemed kalonad,
Mui nemed an anken ! »

.....
Kenavo da viken eta, peogwir eo red,
Amzer va yaouankiz, va gwella mignoned
Ha va mistri garet ;
Kalz ahanoh bremañ marteze 'zo maro,
Em holach marteze ne gavfen, en distro,

Mestr na mignon ebed.

Med n'eus forz e pe leh oh eet ivez brema',
Em halon e talhan ar fiziañs ar vrasa
D'ho kweled eun devez,
Rag oll om bet maget gand lêz ar feiz kristen ;
En despet d'ar maro, skolaerien Lezneven
Ne gollint ket ar vuhez.

.....

C'hwi ar re⁸⁷ 'zo bremañ pleget war an taoliou
El leh ma labourem, o ! c'hwi, bugaligou
Ken dinamm a galon !
Deskit kement kentel a zispleg ho mistri,
Evid galloud eun deiz ouz an droug enebi,
Gand nerz braz hag heb aon.

Ho yaouankiz a zo 'vel an nevez-amzer,
Dirag ho taoulagad pep tra 'zo bremañ kaer,
Kement tra 'zo laouen ;
Labourit 'vid herzel oh an amzeriou kriz
Ho-pezo da dremen, rag al luhed eun deiz
A lintro dreist ho penn.

Hag evel dom, d'ho tro, c'hwi 'vo treh d'ar youlou,
C'hwi 'vezo 'vel reier, ar re⁸⁸, dindan tarziou,
A jom sonn, hep krena,
E-leh beza, siwaz ! ruillet ha diruillet
Evel meinigou skañv, ar re⁸⁹ na gavont ket
Netra d'en em harpa.

Ya, kredit ahanon, eun deiz ar zoñjezon
Euz kolach Lezneven a roy deoh kalon
Da zalher d'ho kredenn ;
Gand ho mignoned ker eh en em weloh c'hoaz,
E disheol ar gwez uhel ha glaz euz ar porz braz,
En eur ziviz laouen.

Meur a wech e soñjoh en ho mistri garet
Ar re⁹⁰, 'vel tad ha mamm, o-deus deoh desket
Beza mad ha nerzuz,

⁸⁷ ar re : "pere" er skrid orin.

⁸⁸ ar re : "pere" er skrid orin.

⁸⁹ ar re : "pere" er skrid orin.

⁹⁰ Ar re : "pere" er skrid orin.

Hga a-uz d'an aoter, e weloh er chapel,
Digor-braz he divreh, evel 'vid ho kervel,
Ho Mamm garantezuz !


VA GOURHEMENNOU DIWEZA

VA COURC'HEMENNOU DIVEZA

Allegretto.



Pa ve zo deuet ar mare E -



vid - oun da ver - vel. Va le - zit c'hoaz em



gwe le Da ga - na Breiz - I - zel Va



le - zit c'hoaz em gwe le Da ga - na Breiz I - zel

Pa vezo deuet ar mare
Evidon da vervel,
Va lezit c'hoaz, em gwele,
Da gana Breiz-Izel.

Lakit etre va bizied
Kroaz or Zalver Jezuz
Ha, gand e groaz, chapeled
E Vamm garantezuz.

D'am zremenvan, hebdale,
Tanit eur houlaouenn,
Me 'zoñjo gweled neuze
En Neñv eur steredenn.

Pedit oll war ho taoulin
Evidon, 'hed an noz,
'Vid ma vo roet, d'ar mintin,
D'am ene, Baradoz.

Ha kerkent 'barz eun iliz
Al Libera kanet,
Va lakit er bez, kenvroiz,
War menez an TOUPET.

El leh, p'oan c'hoaz eur bugel,
E pignen ken aliez !
'Vid gweled oll, en eur zell,
Va bro garet Treflez.

Marteze, beteg ennon
E teuy, beb eun amzer,
Trouz an houl euz ar mor don
O skei war ar reier.